

Eun Novisiadez vihan eus Leanezed an Druéz.

Seur Franseza-Romen

(1906-1929)

(Troet Diwar Paule Fleury-Divès)

Gant an Aotrou Cueguen, person Plegad-Guerrand.

*« O va Jezuz, da bedi ran da deurel da sell
divin war eneo eun niver bras a vugale. Da
aspedi ran da zibab oanigou diniver din eus da
garantez ».*

(Santez Tereza ar Mabig Jezuz)

IMPRIMERIE DE L'ORPHELINAT SAINT-MICHEL
par LANGONNET (MORBIHAN)

1940

Diocèse de
Quimper & Léon
Diocèse de Quimper et Léon

Document numérisé en 2016

33031

Eun Novisiadez vihan eus Leanezed an Druéz.

SEUR FRANSEZA-ROMEN

(1906-1929)

*(Troet diwar Paule Fleury-Divès)
gant an Aotrou Françès Guéguen
person e Plouegat-Guerrand.*

FB
922
FRA

*« O va Jezuz, da bedi ran da deurel da sell
divin war eneo eun niver bras a yugale. Da
aspedi ran da zibab oanigou diniver din eus da
garantez ».*

(Santez Tereza ar Mabig Jezuz)



MONIQUE DELERUE, Enfant



NIL OBSTAT

Henri PERENNES

Doktor e Teoloji, Barner

Kemper, 22 a viz c'houevrer 1939

IMPRIMATUR

Kemper, 22 a viz c'houevrer 1939

† **August COGNEAU**

Evêque Auxiliaire

EUN NOVISIADEZ VIHAN EUS LEANEZED AN DRUEZ

Seur Franseza-Romen

(1906-1929)

I

Eus kostez he zad ez eo Monik Deleru : merc'h, merc'h-vihan da ofiserien belj ; er bloavezioù 1813 ha 1814 e vrezellas unan eus he zadou-koz evel soudard e « *Gwardou Yaouank* » an Impalaer Napoleon kenta. Distrei reas glazet d'ar gêr. Ganet ha savet e ti tud a vrezel, ennan e pakas Monik eur c'harakter start, nerzus, pennok ha padus. Karout a reas he Mamm-Vro, kêr he c'havel ha tour he farrez.

Pedennoù hirvidik e plijas gant ar Brovidanz divin lakaat en dro da c'hanivelez ar bugel-se. Ne ehane an itron Deleru, eureujet eun nebeut miziou a oa d'eun ofiser eus an arme belj, da c'houlenn digant Doue seveni he menna-dou ha re he fried en eur fiziout enno eur c'havel. Siouaz ! e tremene ar miziou ha ne zeue esperanz ebet da laouenât kalon ar wreg yaouank. Petra ray ? Gant ar feiz krenv a gavimp diwezatoc'h en he merc'h hag a chom c'hoaz en eneoù kristen e welomp ar wreg yaouank o vont e pec'herinaj da japel ar Werc'hez dinamm e Kato, hag oc'h aspedi ar Werc'hez venniget da selaou he fedennou. Mont a ra pelloc'h. Prometi ra d'ar Werc'hez galloudus ha dous distrei ehars he zreid pep miz, kerkent m'en devezo an esperanz da veza mamm ha goude ganivelez ar bugel kement c'hoantaet ha gortozet gant kement a vall. O galloud ar

bedenn ! Da viz here warlerc'h, d'ar 13, e voe Monik en he c'havel gwenn hag, eiz deiz goude, badezet e iliz Sant Nikolas, gant aomonier ar soudarded, evel merc'h ofiser. Diwar neuze e soursio ar vamm yaouank he-unan eus he bugel gant aked ha teneridigez, hep morse fiziout anezi e daouarn estren : « Ne daolen pled nemet em bugel, a helle-hi skriva diwezatoc'h, morse ne zilezen anezi nemet diouz ar mintin evit mont da gomunia. Morse neus bet plac'h ebet war he zro ; morse daouarn all nemet va re-me n'o deus kroget enni betek ma c'houlennas Seur X da veilha warni evit mirout ouzin d'en em skuiza re. »

An itron Deleru a oa eur blijadur eviti rei d'ar verc'h vihan eun devosion wirion e kenver ar Werc'hez Vari, lakat ar bugel koant, daoulagad bras ha du d'ezi, da bokat da daolen Rouanez an nenvou, ha deski d'ezi abred ober sin ar groaz ha batouilhat anioiu benniget Jezuz ha Mari. N'oa Monik nemet eur bloaz hag e kasas he mamm anezi d'an iliz evit beza benniget gant ar beleg ha kinniget d'ar Mestr divin. Diwar neuze ez eas ar baotrez, da sul, gant an itron Deleru d'an ofisou. En eur familh ken leun a feiz, e troe ene Monik wardu Doue hag ar vuhez dreist-natur. Karout a rae pedi. Pa veze klanv he mamm garet, e taouline, he daouarn kroazet, hag e pede he-unan evel eun ael.

Abred en doa Monik kalon vat ha c'hoant d'ober plijadur d'ar re all ; ez-vihanik -ne valee ket c'hoaz gwall vat-guelet en doa he mamm, pa veze yen an amzer, o lakat boutou he zad e tal an tan evit m'o c'hayje tomm pa zistroje diouz ar c'hazarn ; eun dervez, n'en eus ket ar verc'hig guelet ar boutou e kichen an tan : tadig en devezo anoued ! Ha hi, raktal, hep lavarout ger, da glask, da ziskoacha ha da lakat ar boutou, he-unan, war... dan an oaled ! Devet e voent, evel just...

Pemp bloaz e c'hortozas eur c'hoar vihan Karget e oa he c'halon a laouenidigez gant ganivelez Mari-Jenovefa ! Nag a blijadur o terc'hel anezi etre he diou vrec'h, o rei d'ezi an dousa anioiu, evel « va aelig » !

Awechou koulsgoude e c'hourdrouze Monik an aelig. Devot e oa dija, hel lavaret hon eus ; gant an oad ne reas he feiz nemet kreski ; anat e oa edo ar baotrezig-se etre daouarn Doue ; da seiz vloaz, he doare d'en em zerc'hel en iliz a jache warni sellou an dud, ken sioul ma oa dirak Doue. Eur sulvez, e richane hag e c'hoarze en iliz Mari-Jenovefa ha n'en doa c'hoaz nemet daou vloaz. Evit lakat al labousig da devel e reas Monik outi sellou du drenv kein he mamm.

Arabat sonjal e oa Monik eul luguden gousket, aes da reiza ; nann. Ar re o deus he anavezet : kerent, mignoned, mistri, a lavar d'eomp he natur terr, prim, touellet gant ar c'hoari e hell enno ober trouz ha diskouez he nerz ; ne blij ket d'ezi ar merc'hodenned, met ar c'hezegevit sevel war o c'hein, lammat ha redek... Brevet e veze hec'h holl c'hoariellou. Daoubennet e veze pep tra ganti ; n'oa ket evit chom pell er memes lec'h, daoust d'ezi da veza bepred mat, karadek, troet da garout ar bleuniou, al laboused hag al loened.

Pa voe embannet gourc'hemenn Pi X diwar-benn komunion ar yugale, e voe Monik, desket gant he mamm devot, ezet da dostât ouz an Daol santel. Gant devosion eun Ael eo e resevas Hor Salver evit ar wech kenta ; da labour Doue en em roas holl he natur nerzus ha beo-buhezek. Alies e komunie da c'houde betek an dervez ma hello komunia bemdez. Aze, e sakramant an dud glan ha nerzus eo e kavo Monik an nerz d'en em suja, d'en em rei, d'en em sakrifia betek an donezon anezi he-unan hep distro... « Morse, a lavar d'eomp eun test, ne 'z eas he

devoision war ziskar, morse ne gavas re hir an amzer en iliz. »

Betek he eiz vloaz ne voe Monik er skol nemet gant he mamm. Met d'an oad-se, pa roe he mamm he amzer da Vari-Jenovefa ha d'he deveriou all, e voe fiziet e Leanezed ar Galon-Sakr. Edod er bloavezh 1913. Ar bloavezh 1914 a stardas c'hoaz unanvez ar vamm hag ar verc'hig : epad ar vrezel an itron Deleru en em gargas adarre eus kelennadurezh ha deskadurezh Monik.

Merc'h d'eun ofiser, savet e doujanz hag e karantezh he bro, e komprenas gwelloc'h Monik, dirak an enebour trubard d'e c'her, priz an enor ha galloud ar Beljik. Karout a reas he mamm-vro gant he holl nerz, fouge enni ouz he gnelet mac'het evit derc'hel he enor ! Muioc'h e lammas he c'halon pa gomprenas en doa ar Beljik dirak ar bed holl talvoudegezh an nerz-kalon hag an enor. Da viken e chomas kizellet gant lizerennou padus e ene ar baotrezig vailhantiz kalonek he roue ha vailhantiz dener ar rouanezh, e kreiz an anken hag ar gwad, kroz ar c'hano-liou ha suturezh ar fuzulioù...

Pa zeue kirri-nij an enebourien da vombeza Mons, elec'h disken d'ar c'hav evel ar re all, krenv gant he feiz, e taouline an itron Deleru er sal etre he diou merc'h, ehars skeuden ar Galon-Sakr. En eun hevelep skol, penaos ne vefe ket deut Monik da gaout eun ene nerzus ha leun a feiz ?

D'ar bloavezh 1916 betek fin ar vrezel, e tistroas Monik d'ar skol, an taol-man e kouent Ursulinezed Mons, chomet er Beljik. Goude fin ar vrezel e chomas sarret an holl skolioù epad eun nebeut mizioù ; adarre e resevas Monik kentelioù he mamm betek he distro daved an Ursulinezed d'ar bloavezh 1919.

Pa reomp eun enklask e kichen he mestrezed skol, e lavaront d'eomp e krevet : « Devot bras ha savet mat e

oa Monik. Kalet e oa koulsgoude he c'harakter ha diaes da blega ; karout a rae beza laketa er maez eus ar studi o sonjal beza taoleta er maez eus ar gouent. »

« Devosion vras d'ar Werc'hez gloriüs Vari, a lavar eun all ; met karakter en e bez, nerzus, dishual, ha ne felle d'ezan plega nemet d'eur volontezh, bolontezh he mamm ! Kalon dener, a lavar c'hoaz al leanezh, dirak ar mad, met poan ganti o pardoni. »

« N'oun ket bet skolaerezh Monik, a lavar eun drede, met dalc'het am eus outi ar sonj-man : bez' e oa eur bugel c'hlan, tener, devot, savet en eur familh gristen. »

Ar pezh en em glevont holl da lavarout eo devoision wirion Monik. Ne bleg he c'harakter nemet d'he mamm ; ourgouilhus eo betek gouela evit an distera rebech. Pebez stourmad e ene ar baotrezig an dervezh ma krogas da vat d'en em reizha ha ma troas oll nerz he natur pinvidik ha kaer wardu ar sakrifiz ! Dija an deneridigezh en doa evit he mamm a leze da darza ar pezh a vezo goest d'ober ; hi hag en eus kement a boan o senti a sent eus he mamm evel eun oanig, zoken araok beza kemennet ; eun taol lagad a ra d'ezhi plega. Ez vihanik e tostae eus an itron Deleru, e lake he fenn du war varlen he mamm hag e lavare, evel dibradet : « Mammig ! Mammig ! » Sentus ha mat eo dre garantezh evit he mamm... Al Leanezed her goarr. N'o deus aon ebet raok an « diaoulig » - se hag a zo vertuzus. Koulsgoude d'ar mare-se n'oa nemet Leanezed an Druenez hag a oa digemeret e kalon Monik ; drouk en doa houman ouz ar c'houentchou, dreist-holl ouz an hini he dalc'he evel er prizon...

Ret e voe d'he mestrezed kemer pasianted ganti. « Koll a reont o fenn ganin ! » emezi he-unan. Gant an amzer e touse he c'harakter, daoust d'ezan da chom start ha leal... Karet eo gant he mestrezed ha ent ar vugale all. « Bez'

en doa, a lavar eul leanez, ar vertuziou roet gant eur gelennadurez kristen. Mat e oa da labourat. Komprenet en doa bolontez Doue warni ha raktal e responte : « ya ! »

« Pa oa Monik etouez ar c'hrennardezed, a skriv eul leanez all, e roen er c'hlas kentelioù galleg. Ne gav ket d'in beza desket kalz a dra d'am skoliadez. Awechou e velen azezi o trei hag o tistrei dre guz eur mell levr oferen hag o lenn ennan eur pennad. Monik a oa he spered e lec'h all. Faltazi eur bugel hag en eus bet eul levr brao, e sonjen-me. Hag e kendalc'hen da lenn dever eur skoliadez pe eur pennad eus va levr.

« En eun taol : « He ! Monik, pebez pled !

« — Va Mamm, a lavare ar re all, o pedi ema Monik ; c'hoant en eus da vont da leanez. N'her gouiec'h ket ?

« — Nann, va bugale ; met ret e vezo d'ezi neuze deski ar wir devosion.

« — Va Mamm, devot kenan eo Monik.

« — En he doare, a dra sur ; ar gaera peden, zoken evit eul leanez, a zo ober evit Doue an dever zo d'ober. »

Livet eo d'eomp evelhen gant eul leanez all : « Plac'h yaouank devot kenan, aketus da ofisou he farrez, prest atao da lakat gant bokedou an aoteriou ha da zresa lienaj an iliz, awechou diwar goust he deveriou a skoliadez. »

E berr gomzou, daoust d'he natur prim ha d'he c'harakter diaes, ervez he holl mestrezed, ez eo Monik ecun, leal, prest atao d'ober plijadur d'ar re all zoken diwar he c'houst, mat da labourat ha troet kenan da bedi ha da servicha Doue.

Met, e c'houlenn'er awechou, e petra sonj ar baotrez-se alies o huve al ? Setu aman : er c'hlas saosneg, e vel ar vestrez ez eo gwisket he skoliadez gant dilhad goanv, hag edod e kreiz an hanv. Goulen a ra, souezet : « Monik,

perak hoc'h eus laket eur vroz gloan teo ? Re domm ho pezo ! » — « Evit en em voaza eus an hini a zougin diwezatoc'h, a respont Monik... »

D'an 23 a viz even 1919, e resevas Monik gant eur feiz krenv, sakramant ar Gonfirmasion e japel skolaj Santez Wodru, digant an aotrou 'n eskob Croy, eskob Tournai... N'eo ket en aner eo e resevas ar Spered Santel...

Sklerijennit hor sperejou gant ho koulou,

Skuilhit ar garantez en hor c'halonou

Ha skoazellit gant ho nerz

Hor c'horf leun a sempladurez...

Diskouezit d'eomp Doue an Tad,

Diskouezit d'eomp Doue ar Mab,

Ha bezit hoc'h-unan, o Spered Glan,

Magadurez hor feiz!...

Bez' en devoe Monik, en eun doare souezus, donezon an devosion.

II

Gant Monik e kreskas galv Doue. E lec'h ebet ne lavar-hi pevare e klevas mouez Doue ouz he gervel. Atao e voe bet troet wardu Doue. N'oa ket graet he ene evit kerzout dre an hentchou darempredet.

Koulsgoude e voe stourmajou, ha penaos ne vije ket bet en eun natur ken pinvidik, ken brokus, ken leal, met dibennask, pennok ha terr! Anaout a ra hi galv Doue : « An neb a fell d'ezan dont d'am heul a dle kemer e groaz ha bale war va lerc'h. » Ret eo eta dougen ar groaz evel Jezuz Krist, da lavarout eo gant karantez.

« Met re gaer ha re ziaes eo an dra-se evit beza tizet el lamn kenta. N'hellomp tizout ar pal-se nemet nebeut ha nebeut. » (P. Rouvier).

Gant nerz-kalon e kemeras Monik penn an hent... Met spontet eo awechou gant ar groaz. Ret e vezo kuitat eun tad, eur vamm garet, Mari-Jenovafa, he mignonezed... Ar pezh a gar, zoken ar Beljik ! rak dija e oar Monik da beseurt leandi e yelo... Ha neuze etre an natur hag ar c'hras e voe stourmajou yut. gourinou leun a wad hag a zaelou. Eun dervez — c'houezek vloaz en doa neuze Monik — en eur vont e kambr ar plac'h yaouank, e kav an itron Deleu anezi o tifronka. Souezet ha nec'het gant an daelou-se, ne oar da betra tamall, e ra ar vamm ouz ar verc'h goulenn war c'houlenn. Monik da respont, eun tammig terr : « Mamm, santout a ran e vezin leanez... Ret e vezo d'in beza leanez... met ne fell ket d'in... heuz am eus diouz ar c'houentchou. Ne lezit ket ac'hanon da vont kuit. Promet d'in n'am lezi ket da vont kuit. »

Eur miz goude, memes amzav ha memes stourmad. Ar pezh ne vir ket ouz Monik da govez d'eur leanez karek, Seur X., ez eo galvet gant Doue da vont e Urz an Druéz,

Heuz en eus ouz ar c'houentchou, en eus-hi diskleriet d'he mamm, d'an euriou tennal ; met eur wech adkavet ganti ar peoc'h, e tibab kouent an Druéz... Hep dale ne vevo mui nemet evit en em brepari da veza eun dervez, hi ivez, servijerez vihan ar beorien hag ar glanvourien, eul Leanez kalonek an Druéz.

Pell e vezo c'hoaz a-raok ma velo Monik an dervez ben-niget-se. Da c'hortoz, e labouro-hi evit Doue hag an nesa, hag e klasko sakrifiz he natur nerzus.

O Krist, hor sklerijen,

Ne fell d'omp digemer nemet da wirionezou ;

D'it, e pleg hor spered, selaou, Mestr, hor peden,

Ha dindan da yeo dous, reiz hor bolontezioù.

Nebeut ha nebeut e lako, en eul labour padus, he bolontezioù e bolontez Doue.

*
* *

Seitek vloaz en eus Monik ha graet ganti he studi ; evit mat e tistro da di he zad.

Bez' ez eo eur plac'h yaouank kenedus, ampart, bras he ment. Yec'hed en eus da werza. Eur blijadur eo he darempredi. Sell kaer he daoulagad doun a ra d'an dud plega d'he bolontez. Hep na fellfe d'ez e tenn he dremm daoulagad an dud warni, zoken pa vez etouez ar merc'hed yaouank all. D'ez eo he doare bale, sec'h ha nerzus ez a he zroad d'an douar...

Respontet en eus en he c'halon da c'halvedigez Doue. D'he seitek vloaz eo e c'houlenn Monik digant he zad an aotre da vont da gouent an Druéz. — « Ya, emezo, pa ho pezo eur bloaz war' n ugent. » Peanias e kavas Monik an dra-se.

Diwar neuze e veve, e gwirionez, kement ha ma helle, buhez ar gouent, en eur gastiza he c'horf, en eur zioueret

eun draig bennak en he frejou, nemet d'argouelioù ; an derveziou all e c'houlenne digant he mamm aotre da sevel d'he c'hambr gant eun tamm bennak evit ar beorien. Epad he bloaveziou diweza er bed, e oa arc'hant d'ezi he-unan etre he daouarn ; e aluzennou, e oferennou pe e kalanna d'ar re a gare en dro d'ezi e troe he leve.

Deski reas he-unan ar « Stenografi » hag eun tamm latin ha gregaj. Heulia rae lidou an iliz gant kalon goude beza desket anezo e Kannadig Lophem-lez-Bruj, skrivet gant Tadou Sant-Beneat. Atao e veze e tal he fenn-vele al levr-oferen a blije kement d'ezi, ez vihanik, epad curiou ar c'hlas ; karout a rae pedi gant an Iliz ha harpa he feden ouz peden an Iliz.

Skiant eul louzaouerez er Groaz-Ruz e pourchasas ivez Monik.

Aketus e oa da labourat evit an ilizou paour, evit an aoteriou, en eur vroda gant he dorn mibin.

Ijin en doa ivez, ez yaouank, da liva taolennou. Souezus da velout eo ar re a zo chomet war he lerc'h, met amzer n'en doa ket da lakat an talant-se da dalvezout.

Ken leun oa he derveziou !

Mintin mat e save... Chomomp eur pennad da velout he spered a beden, ar spered a zevosion ken bras enni...

Ez vihanik, en doa gullet he c'herent hag he mestrezed ne gave morse re hir an amzer en iliz ; dre ma vrasac, ne reas he sec'hed a draou Doue nemet kreski.

« C'hoant hoc'h eus da gemer penn an hent ? Pedit... a skriv Anjela a Foligno. C'hoant hoc'h eus da greski ? Pedit... C'hoant hoc'h eus da sevel war ar menez ? Pedit... Beza parfet ? Pedit. C'hoant hoc'h eus da bignat uheloc'h eget ar sklerijen ? Pedit. » Hag evit kaout donezon vras ar Gantez, c'hoantaet eus holl nerz he natur, e pedas Monik gant kalon, hep ehan, hep fallgaloni. Skoet eo ar re a vev ganti

gant merkou he devosion. Netra nemet dre he skouer vat, dre he doare d'en em zerc'hel, hep her gouzout, e prezeg Monik, e tenn Monik ar re all d'he heul, ez eo Monik abostol.

« Lavarout d'eoc'h ar pezh am eus gullet eus devosion Monik hag ar santimanchou a voe em c'halon dirak ar gristenez kenedus-se, a ro d'in levenez ha c'hoant da wel-lât, a skriv eul Lean. Klask a rin he liva evel m'am eus he gullet bemdez epad pemp bloaz, d'he barn evel m'am eus he c'homprenet.

« Evit lavarout ar wirionez, diskouezet e oa bet d'in evel mat evit ar beorien, koulz lavarout re vat.

« N'oa ket devotoc'h egeti er barrez ; eno ec'h en em ziskoueze kristenez d'ar prenn.

« Kavet e veze en iliz mintin mat ha bemdez. Ne vire ket ar yena amzer outi da zont ; na kac'h eo kement-se !

« A-raok an oferen genta, alies e veze graet ganti Hent ar Groaz. An derveziou all e teue d'an iliz eun nebent minudou a-raok an oferenn dremmet d'ezi. Eur wech d'an daoulin, e lake he levriou dirazi : al levr oferen ha n'ouzon ket peseurt levr all. Ne veze ket pell he bizied lijer o verka pajen oferen an dervez.

« Dre respet evit lidou an iliz e komunie da vare komunion ar beleg. Lavaret e vije eun Ael pa zistroe diouz au Daol-santel. Pa gave an tu, awechou ez ae da gomunia gant Leanezed an Druéz. Evelse e tanvae, a-raok an eur, al levenez da veza ar pezh ez int. Eur respont da c'halvedigez an Aotrou Doue e oa marteze an dra-se. Hep mar ebet, e plij d'ezi beza ilin hag ilin ganto evit santout en he c'horf beza unan anezo. Evelse e komunie er C'hrist hag en he huvre. Evelse ivez e verke ar pezh e oa.

« Ne voen ket souezet o klevout diwezatoc'h e sonje beza leanez e Urz an Druéz. Bras, krenv, ampart evel ma

oa, bez' e oa evidon skouer huvreet eul Leanez graet evit ar glanvourien, pe evit ar misionou.

« Sonjal a read kerkent e galvedigez Doue roet gant eur vouez dous ha nerzus war-eun-dro... Awechou goude bennoz ar Sakramant kanet e kouent an Tadou evit peder barrez kêr, ec'h en em unane gant Leanezed an Druéz evit derc'hel kompagnunez d'ezo. Skler e oa edo tennet gant Doue.

« Dre ar strejou dizeblant, da zervezioù ar Rogasionou, ez ae gant eun toulladig tud feal da heul eun nebeut beleien, war evez eveldo da gana al Litanioù, henvel he-unan eus eur beleg dre he bale, gant he sell en he levr oferen.

« Da c'houel ar Sakramant e touge banniel ar Werc'hez d'ar prosesion pe sikoure dougen skeuden an Itron Varia gant merc'hed yaouank all gwisket e gwenn.

« Neuze e rikle goustadik greun he japeled etre he bizied. Nag a levenez ne gave-hi ket o lavarout anezan ! Meuleudi da Vari, pedennou kaset d'ezi... Ne chome ket da bara he daoulagad du leun a dan... E diou pe deir brosesion graet er barrez gant he rummajou tud, e c'helled evelse guelout anezi, bepred devot ; heb ehan e koueze an Ave diouz he muzellou.

« Kalz a dud e vod prosesion relegou Santez Wodru adreuz strejou kêr. Kinniget e vez metalennou, japeledou da douch ouz ar relegou, met nebeut a zevosion. Mat, ne ehane Monik da bedi ; atao e paterie. Pe seurt tan, emonne, a zev er galon-se ? Petra lake he ene da sevel bepred uheloc'h eget ar bed-man ha da chom devot d'an Itron Varia ?

« He japeled ! Ret e vefe bet he guelout o lavarout anezan en iliz ! A dra sur n'oa ket he rozera eur beden c'houllo hag inouüs. Diouz goueled he ene e tarze. Skler e oa e pede he

spered hag he c'halon. Souezus, e gwirionez, e oa he devosion d'ar Rozera.

« Ha mall en doa da veritout ? Ha fellout a rae d'ezi trec'hi he nerz ? O pedi evelse e vije lavaret e stenne wardu eur pal a santelez souezus. Gouzout a rae petra d'ober. Aes e oa guelout ne chomje ket da c'hoariellat. Kemm brasa oa etre ar yaouankizou foll hag hi.

« Sarret e oa he dremm hag en he daoulagad e teve en diabarz eun elfen a dan ha na skede ket kement pa goueze warnoc'h he sell. Evel mezek e tec'he an ene, rak, e gwirionez, he daoulagad a ziskoueze he ene dem-guzet c'hoaz gant he dremm gwall-livet. Ennon va-unan, ec'h anven neuze anezi « al lilien vras ».

« Sonjal a raemp e oa evelse hed an deiz he ene oc'h adori Hor Salver e Sakramant an Aoter. Evel eun ael, e gwirionez ec'h adore d'ar Yaou-Gambrlid, e tal an Tabernakl. Mintin mat e veze eno, meur a wech war an deiz, ha diouz an abardaez ; koulz lavarout bepred eta ! Ne vanke morse da ofisou ar barrez ; heulia rae miz Mari, miz ar Galon-Sakr, miz ar Rozera. Evel eus an iliz e oa. Ha gwelloc'h c'hoaz, skouer e kemere diwar ar veleien dre he doareou ; pa save ar veleien hi a save ; pa blegent o glin, hi a blege he glin. En he save e veze epad ar *Magnificat*, stouet e veze he fenn d'ar *Gloria Patri*, daoubleget e veze izel d'ar goreou, oc'h adori an Osti savet. Beva'rae servij Doue.

« Lavaret e oa bet d'in he zruez dous e kenver ar beorien hag an emzivaded. E gwirionez ne oa desket netra d'in : ar mad a red. Hi hag a oa devot, hi hag a gomprens hag a gare lidou an Iliz, hi hag a bede ken kalonek, hi a dlee en em westla d'eun abostolaj bennak.

« Ha neuze, eun devosion ken nerzus a ziskouez eun ene krenv, eur feiz start hag eur spered a sakrifiz.

« En eur ger, evit troc'ha berr, yac'h ha krenv e oa a ene hag a gorf. An er en doa da gemenn da Zoue en he devosion, kement a volontez hag a nerz kemmesket a zous-ter a oa enni.

« En eur ziskouez e kare hag ec'h ouie pedi mat, e voe abostol.

« Evidon-me e oa skeudenn barfet an devosion, an hini zo er galon... ha war an daouarn... Eun ene pinvidik a zonezonou. »

III

Guelet hon eus er pajennoù diweza galvedigez Monik o startât hag ar skouer vat a roas en-dro d'ezi. Poaniomp breman da zisken en he ene evit klask kevrin he buhez dreist-natur hag he aked da labourat evit ar re all... Dre ma pede, Monik en doa eun ene leun a *Garantez*.

Ar *Garantez*-se o kreski d'he heul ha da heul he sakrifisou eo a roas d'ezi he santelez.

Da stourm en devoe c'hoaz... Terr e oa Monik en he santimanchou, prim da gemenn. « Ret e voe d'in alies, a lavar an itron Deleru, digas da sonj d'ezi e oan aze evit kemenn; neuze ec'h anzave e vele he defaotou, met ne ouie ket o reiza. » Madelez Doue o leze ganti evit kuzat he donezonou burzudus, he dalc'hen izel a galon, kreski he meritou... ha dre ma oa umbl ne fallgalonas morse en hent wardu Ennan; klask a rae tizout Doue, ar garantez hep muzul, dre ar sakrifiz anezi he-unan.

« Evit en em santelât n'eus nemet en em rei da Zoue a greis-kalon. « Kar ha gra ar pezh ac'h eus c'hoant », a lavare sant Aogustin, rak mar karez Doue ne ri nemet oberou a garantez, e tec'hi diouz an drouk a zistruj ar garantez, e tioualli diouz an danjeriou a hell he c'holl. »

Komprenet en eus Monik e vezo ret d'ezi seveni he galvedigez, en em rei da Zoue *dre Garantez*... Komprenet en eus ivez e tle « rei d'Ezan he c'halon a-bez » hag ober dre garantez ar pezh a zo d'ober a eur da eur, dougen ar groaz a zigouez tec'hout diouz an drouk difennet. Mar ne sonj ket e Doue d'an eur-se evit rei d'Ezan he c'halon, n'eus ket aon : en em roet ez eo pell zo... Kinniget eo bet he holl oberou da Zoue... Bez' ez int frouez eur wezen roet da Zoue meur a vloaz 'zo hag as-roet mil gwech.

« En em santelât, a skriv en eul levr kaer an Tad

Schryvers, a zo eta en em rei da Zoue d'an eur a-vreman dre eun akt a garantez birvidik, en em rei d'Ezan evit ober e volonte, pephini ervez e nerz hag e sklerijen, o lezel anezan d'ober eus e grouadur ar pezh a gar, o rei d'ezan an amzer dremenet hag an amzer da zont, o karga anezan da velout, da reiza, da rapari pep tra... »

Monik a ouie ivez « ez eo ret, pa vez c'hoant da garout Doue, en em ankouât hag en em rei d'ezan hep marc'hata, eur wech evit mat. » Neuze « e tle an ene disken e Doue evel eur maen stlapet en islonk. Biken ne zistroy ar maen-se d'an nec'h ha morse ne servijo da labour an den. » Setu ar pezh a fell da Vonik ha netra ken.

Her c'hask a ra hep skuiza dre he devosionou graet d'ar prenn, ne vern penaos ez eo troet he c'halon; her c'hask a ra en eur zeski Doue gwelloc'h; her c'hask a ra o sonjal e pasion hag e poaniou Jezuz-Krist; her c'hask a ra er sakrifiz, en donezon anezi he-unan... Nag a dro eviti d'en em sakrifia!

Da stourm en devoe, da genta, enep d'he natur entanet ha nerzus... Poaniou en devoe da c'houzanv, digaset gant Jezuz; poaniou hag a vrev hag a zistag, « poaniou ha ne vezint gouezet morse war an douar », a skrive Tereza ar Mabig Jezuz, dre ma 'z int re galet ha kuzet er galon...

Da c'houde, ar sec'hed a vuhez relijius a vire he zud outi da derri war an eur. D'he naontek vloaz, d'ar 15 a viz here 1924, en doa Monik renevezet he goulenn, met hep beza selaouet; ret e voe d'ezhi gortoz he bloaz war'n ugent.

Ha c'hoaz mil sakrifiz all graet dre garantez, e doare Santez Tereza ar Mabig Jezuz, ha kuzet dindan eur mousc'hoarz.

Hag erfin ar bed a voe ret d'ezhi chom ennan hag ober ennan he deveriou a verc'h ofiser uhel e karg. Hag eeun

hag eeun e oa an tad evel lorc'h ennan gant e verc'h hena.

Koulskoude, nebeut ha nebeut, tapet a-bez gant he huvre, e veve Monik er bed hep kemer perzh en e vraoigou... Izel e chome a galon, re izel ervez he zad a lavaras d'ezhi meur a wech p'en doa-hi da vont gantan : « N'am eus ket ezomm eus eur baourez ganin », an dra-se, evelato, hep gourdrouz met evit rei d'ezhi da gompren e oa re zister he dilhad. Eun abaden goude e tistroe Monik gant dilhad bravoc'h.

Alies ez eas gant ar major Deleru etouez an ofiserien, he-unan awechou egiz plac'h yaouank. Met war eun dro ec'h ouie Monik gounit ar c'halonou ha kemenn ar resped... Bez' e oa dreist traouerez an douar; sevel a rae an eneou hag ar c'halonou netra nemet dre he dremm seven ha din...

Diouallet e oa gant Karantez Doue...

He skol, he deveriou er familh hag er bed, he oberou a leunie he dervezioù digoret abred. Gouzout a rae lakat urz en he labouriou. Prest e veze atao da servija he c'herent, ha gant pebez kalon dener! « Pa oan klanv, a lavar he mamm garet, e veze Monik noz-deiz war va zro, prest atao da seveni va mennadou. Ret e veze d'in, pa zeue an noz, kemenn d'ezhi eun tamm diskuiz; diwezat e veze o vont da gouskat ha bemdez e save a-raok pemp eur; met berroc'h e oa he devosionou pa oan klanv; eun aoter en doa da ficha evit digemer an Aotrou Doue a veze digaset d'in bemdez. »

Etouez an oberou e labouras Monik enno, ema da genta « Emgleo Katolik merc'hed yaouank ar Beljik ». Karout a rae he c'helc'h-studi a greis-kalon.

« An enor hag ar blijadur am eus bet d'en em gaout gant Monik Deleru e kouent an Ursulinezed, er skol reizet

er bloaveziou 1923-1926 gant Unaniez ar merc'hed katolik evit deski relijion ha « Sosioloji ». Ret eo d'in anzav n'am eus dalc'het sonj eus an amzer-se nemet eus dremm eveziek Monik, e skrive an aotrou Larsimont, Rejant O. S. Mons. Met da fin ar bloavez 1926, o veza diazezet eur c'helc'h-studi evit merc'hed yaouank Unaniez Katolik ar Beljik, tro am eus bet da velout Monik pep miz en eur sal eus Ti micherourien Mons.

« Hag e hellan lavarout e voe Monik aketus ha seder er bodadegou hag en devoe komprenet gwelloc'h eget den talvoudegez an emgleviou savet evit ar yaouankiz hag an holl vad a hell ober al Labour Katolik graet gant tud ar bed en tachennou sarret ouz ar beleg.

« Klask a raen lakat an demezelled da labourat pephini d'he zro, evit rei tro d'ezo da hardisât, da zastum mat o sonjou hag evelse da sederât ar c'helc'h-studi.

« E gwirionez, souezet e voe an holl o kaout e Monik eur spered digor, bolontez vat, aked da labourat heb argila pa veze lavaret d'ezi n'oa ket al labour ouspenn d'ezi. Muioc'h souezet e voen c'hoaz o velout o kreski enni, gant ar youl d'ober vad, ar c'hoant da zeski ar skianchou a sell eus an dud o veva e kevret. Meur a wech e trugarekeas ac'hanon da veza diskouezet ar vuhez evel m'ema hag an doare d'he beva.

« Hep beza bet amzer da zivizout kalz gant Monik, gellet am eus guelout e taole pled em c'homzou etouez merc'hed yaouank dizeblant, ha skoet e voen gant he doare da vleina darempred an dud etrezo : lemm e oa he spered, entanet he c'halon evit an Oberou katolik. »

« Epad an eil bloavez skol reizet e kouent Leanezed Santez Ursul gant Unaniez Merc'hed Katolik ar Beljik, eo am eus anavezet Monik, a skriv d'eomp eur plac'h yaouank eus he oad. Buhan e teujomp da veza mignonezed bras. »

« Pa ne veled nemet he ment uhel hag he dremm terr, e fazied o kemer anezi evit eur plac'h yaouank lorc'hus. Gouzout a rae, a drugarez Doue, gounit an dud diwar an taol kenta, dre he doare seven hag he c'harakter seder hag entanet. Leun a spered, douget d'al labour, dont a rae abenn eus an traou diaesa ; uhel e save he sonjou.

« Enni pep tra a c'hounenze ar c'halonou. Pep tro p'en em velemp, e krenvae liammou hor mignonaij ; evel diou c'hoar e oamp, zoken d'ar bloavez 1926, pa savas an aotrou Larsimont eur c'helc'h-studi evit ar merc'hed yaouank eus an A. C. J. B. F.

« En em voda raemp eur wech ar miz evit deski penaos e tle an dud a bep stad darempredi etrezo. Hep dale ivez e voe goulennet sikour ar merc'hed yaouank wardro an oberou katolik. Kerkent en em roas Monik d'an oberou-se, ret e oa guelout gant pebez kalon ! N'oa ken kaoz ganti nemet d'ober vad muioc'h-mui bemdez. Prisius e voe he sikour, dreist-holl pa venne d'ar re all fallgaloni. »

« Setu aman eur pennad eus eul lizer skrivet ganti eur wech er gouent hag a ziskouez he mennadou en amzer-se :

« Ne gredfec'h ket, va mignonez, pegement e choman stag eus hor c'helc'h-studi ! Her prizout a raen kement ! met breman hepken eo e komprenan mat awalc'h e dalvoudegez ; ken mat oa e spered ! Ennan da vihana e teskemp ar vuhez wirion gant he zrubaillhou ; ennan e teskemp beza, n'eo ket merc'hed yaouank ha ne sonjont nemet er blijadur, met merc'hed yaouank kalonek prest atao da labourat a zevri evit frealzi, konforti ar beorien dizesk ha dilezet ha dre-se gwalleürus ; ennan e oamp c'hoarezed dre ar garantez kristen... Nag e karfen guelout ar merc'hed yaouank all o kompren ar c'helc'h-studi evel m'her c'homprenan, evit hen darempredi. (31 a viz here 1927).

« Kaout a rae koulskoude an tu da labourat ; gueladen-nou d'ar glanvourien ha d'ar beorien ; sikour d'ar « Berad laez » evit bugale soudarded ; kefridiou war varc'h-houarn da gas paperou pe da lakat ar vugale da c'hoari epad an ehan-studi ; paperou da zerc'hel e urz, hag all... hag all...

« Ha pegen seven n'oa ket he mousc'hoarz pa c'houlenned diganti sikour ha skoazel ! »

« N'eo ket bet diaes d'in gvelout pegement e labourer Monik evit silvidigez an eneou, a skriv eus e du an aotrou Breguenier, aomonier soudarded Mons. Diwar an dervez ma c'houlennis diganti teurel pled en oberou savet evit ar soudarded, ec'h en em westlas d'ezo a greis-kalon. Kavet en doa e ti he zad eur garantez vras evit an arme hag he c'hoant d'he gounit muioc'h-mui da Jezuz ne reas nemet kreski en eur santelât he c'harantez.

« Kaout a rae d'ezi ne c'houlennen ket sikour awalc'h diganti. Bepred e veze o klask labour, ne vern pe seurt : diouall ar vugale, skriva pe derc'hel ar rollou en urz a zeiz da zeiz, pep tra a blije d'ezi. Rak-se pa zeuas Doue d'he gervel evit Seez, ne ouie ket penaos amzav d'in ar c'heuz en doa da zilezel eun abostolaj karet.

« Diwar neuze n'helle mui nemet pedi evit an oberou-se ; her prometi reas d'in dervez ar c'himiad ha pep tro ma roe d'in eus he c'helou. Doue oar en eus-hi dalc'het d'he ger ! D'ar pedennou entanet-se e tleomp da velout an oberou-se aet ken buhan war gresk. »

Unan eus joaiou Monik a oa mont gant Leanezed an Druez da velout ha da louzaoui ar glanvourien baour. Dija e teske ar vicher e raje warc'hoaz.

« Labourat evit ar re all, n'eus nemet an dra-se hag a dalv », e skrive- hi d'unan eus he mignonezed. Hag e servij pep tra ha pephini e vezo al labour-se.

Ha ne veler ket merc'h an ofiser, epad eur c'hlenved

diwasket gant kloc'her Sant-Nikolas, o kemer e lec'h evit mirout ouz e wreg war an oad d'en em skuiza, hag o sevel he-unanken brao ha tra en tour da seni Anjelus ar mintin, ar c'hreisteiz hag an abardaez, oferennoù c'houec'h ha seiz eur, betek m'en do ar c'hloc'her adkavet nerz e vrec'h.

Setu aze Monik : mat, seven, nobl.

IV

Emomp e miz here 1927. He bloaz war 'n ugent en devezo Monik d'ar 13 hag ema o vont da echui ar peniad amzer gortoz laket d'ezi gant he zud evit guelout ha start eo he galvedigez hag aotreer gant Doue.

N'o deus ar major hag an itron Deleru douetan ebet ken war c'halvedigez o merc'h hena. N'eus d'en souezet ebet; daoust ha buhez Monik n'hen embanne ket skler awalc'h? Bet en eus epad ar pemp bloaz-se Leanezed an Druer dirak he daoulagad evit he c'hennerzi en he « harlu », met ne rae an dra-se nemet kreski he c'hoant...

« Va Mamm enorus, e skrive-hi d'an 31 a viz genver 1935 da Superiorez an Druer, gant kalz a blijadur e teu ho pugel da ginnig d'eoc'h e wella rekejou a vloave mat, santel hag eürus. N'hellan ket, siouaz! hen ober a c'hinou, met a greis-kalon ha gant ar vrasa devosion e kemeran perz e naved an Urz. Kinnig a ran d'an Aotrou Doue, dre zaouarn ar Werc'hez glorius Vari, va holl fedennou ha va mennadou evit ma plijo gantan, eus e du, rei d'eoc'h ha d'hoc'h Urz e vennoziou divin.

« Siouaz! n'am eus ket a gelou mat da gas d'eoc'h, rak bete vremen e talc'her mat d'an oad merket d'in ha n'am eus fizianz ebet da vont kentoc'h d'ar gouent; koulsgoude, en desped da bep tra, esperanz am eus da velout an harlu krennet; pedi ha gouzanv a ran kement!... Eürus oun o sonjal e kas an trubuilhou-se ac'hanon dre eun hent hir met asur wardu ar pal kement gedet. Gortoz a ran pep tra digant ar Werc'hez Vari ha digant ar Plac'h eürus Tereza ar Mabig Jezuz; fizianz am eus e roy houman d'in ar c'hras kaer-se d'an dervez ma vezo hep dale diskleriet santez; n'hello nac'h netra ouzin an dervez-se. »

Ne voe ket roet ar c'hras-se d'ezi. Met, erfin! deut e oa

an dervez merket hag, aotreer gant he zud, e pourchasas Monik ar c'himiad laket d'an 19 a viz here.

O lavarout kenavo e tremenas an derveziou diweza.

Nag a boan evit ar galon-se karadek, entanet ha tener, oc'h ober ar sakrifiz eus ar gêr, eus he c'herent muia-karet, eus he c'hoar vihan, eus he mignonezed hag eus he oberou!

Da eur ar c'himiad diweza e teu sonj d'ezi eus kement tra en eus sikouret anezi evel plac'h yaouank da ren eur vuhez frouezus, kaer, dous, daoust da zrez an hent ha d'ar poanioù a drenk pep levenez en draonien-man. Sonj a zeue d'ezi eus he beajou kaer graet gant he zud.

Ez vihanik, d'he fevar bloaz, pedet en doa dirak Itron Varia Lourd. Ne voe morse distrujet ar merk aet ken doun en he ene.

D'ar bloave 1919, evit an eil gwech en em gave ehars treid ar Werc'hez dinam evit kinnig d'ezi he mennadou hag he galvedigez. E Paris, e kasas he devosion anezi da ilizou ar Galon-Sakr hag Itron Varia ar Viktoriou.

Er bloaveziou 1920 ha 1921 e velas aotrou ar Beljik; er bloave 1922, an Alamagn: kana reas he ene frommus dirak ribl ar Rhin, e gestel koz gwintet evel neizou erer war rep'hier uhel, e dier eslammus savet e rez ar ster vras pe guzet er c'hoajou doun. Guelout a reas an eil warlerc'h eben: Aix-ar-Japel, Kologn, Wiesbaden, Düsseldorf. Er bloave 1923 ez eas d'an Itali; kaer e kavas eno an oabl glas ha morse ne ankouas ar maeziou ledan gant o guez trist o lenva e tal paleziou dismantret pe e kichen beziou guenn. Guelout a reas Turin, Milan, Veniz. E Turin e stouas he fenn dirak al linser santel. Ac'hano e teuas d'ar Savoia. E Annesi, e tremenas eur pennad amzer war ribl al lagen hag e kavas beobuhezek ar sonj eus Sant Fransez a Sal hag eus Santez Jann a Chantal. Morse ne lezas a gos-



MONIQUE DELERUE, Jeune Fille

tez he deveriou a zevosion epad ar beajou plijadurus-se. Eus he beaj e Annesi e talc'has eun devosion entanet betek fin he buhez.

Er bloavez 1924 e kavomp anezi e Middelkerk. Eviti e oa bepred eun dudi beza war ribl ar mor, met adalek an amzer-se ne zeas mui da neun ha dija, evel eul leanez, e tec'he diouz an neuerien.

Er bloavez 1926, e voe adarre e Lourd, da viz guengolo ; neuze e oa eno pec herinajou bras. Lufr e roe d'ar goueliou ha d'an ofisou ar C'hardinal Maurin hag an aotrou 'n eskob Poirier. Souezus e oa eno niver an dud. Dont a reas Monik a-benn da gaout eur bennoz eviti he-unan digant ar C'hardinal laket ganti e kevrin he galvedigez. An drede gwech a oa d'ezi da vont da Lourd, hag ar wech diweza. Tremene a reas derveziou penn-da-benn er Grott hag en iliz-veur. Ac'hano ez eas da Sant-Sebastian er Spagn ha da Viarritz.

Monik a gare guelout broiou ha kêriou, pourmen war ar maeziou heoledet, sevel war ar menezioù uhel ; n'oa ket par d'ezi d'ober ar vicher-se heb en em skuiza. Gant he zad e rae peurluvia he fourmenadennoù : e c'hoariou diskuizusoc'h e kemere perz an itron Deleru ha Mari-Jenovefa...

En he c'halon, e lavare Monik kenavo d'ar beajou-se o doa uhelaet he ene ; kenavo e lavare da joaiou dous ar familh ha d'ar blijadur da sevel war gein « Margerit », marc'h ar major Deleru.

A dra sur, n'en doa keuz da netra ; met da eur ar c'hi-miad e kave Monik douser gant an traou-se.

Ha neuze, ret e oa d'ezi kuitât he bro gaer, ar Beljik, ha dre ma kare kalz he bro e voe bras he sakrifiz.

Rannet e voe ivez he c'halon pa voe ret kimiada diouz he mamm garet. Graet en dije ne vern petra evit diboania

he mamm hag ez-vihanik dija ec'h ouie sec'hi daelou he daoulagad. Ha ne oa ket hi bet gueleit, eun dervez, o kin-nig d'ezi eun daolen goude beza skrivet warni en he yez a vugel : « Na ouelit ket, mammig ; pedi 'ran kalz an Aotrou Doue evit na rin poan ebet d'ec'h morse. »

Hag ar vamm-se karet gant kement a deneridigez, edo Monik o vont d'he dilezel evit respont da c'halv Doue.

« N'eo ket d'in ouzin, en doa lavaret ar Mestr, an neb a gar e dad hag e vamm muioc'h egedon. »

Dreist pep tra e kare Monik an Aotrou Doue, hag evitan, seder ha laouen e kuitae pep tra.

Met an'holl sakrifisou-se, Monik o greas a greis-kalon, eus he holl ene, gant holl nerz he bolontez, hep sellout war he c'hiz... Pemp bloaz a oa en doa-hi huanadet war-lerc'h an donezon leun, ha deut e oa an eur !...

* * *

Chomomp eur pennad da studia Urz an Druéz, an Urz edo Monik o vont ennan ; aesoc'h e vezo d'eomp goude-se mont ganti dreist treuzou benniget ar gouent.

« E gwirionez ez eo ar garantez sklerijen Doue, divent evel dan e-unan, a skrive Rosa Ferucci. An neb en eus tapet eur bann outi en e galon a dle hen rei da santout d'ar bed holl. »

« E kalon ar sent e chom ar garantez divin-se evel eienen o oberou, o nerz-kalon, o sakrifisou, o hardizegez. Savetei reont ar bed dre ma ouezont karout.

« Daoust ha n'eo ket ar garantez divin-se o labourat en eneou eo o laka da sevel, d'an eur merket gant Doue, an Urziou, an oberou diniver a vleun ken dudius e liorz an Iliz ?

« Ha n'eo ket karantez Doue eo a oa e kalon menec'h bras ar Grenn-Amzer o deus kenteliet ar bobl ha savet an ilizou-meur ? Dont a raent, en o saeou gwenn pe rous, en

amzer-se hag e oa enni terr an dud ha garo ar c'hiziou, evel skoueriou beo Jezuz-Krist, ar vadelez, ar sakrifiz o skedi war o zal... Karout a reomp ar memes tan e Tadou Urz sant Bruno hag e Tadou Urz sant Bernard, tud hag a zibabe lec'hioù sioul ha didrouz evit en em rei d'ar beden, d'ar studi ha d'al labour.

« Daoust ha n'eo ket ar memes karantez divin a oa e ene ar re o deus diazezet Urziou edoug ar c'hantvejou ? Hag ar garantez-se, he c'haout a reomp, skedus ha frouezus, e kalon an Tad Bazin, diazezeour Urz Leanezed an Druéz, ema o Mamm-Di e Seez, en Orn.

« Gueleit en eus, eus eun tu, peorien hag a varve en o zi, en dienez, hep sakramanchou, en tu all, eun niver bras a verc'hed yaouank c'hoant ganto mont da leanezed heb her gellout, dre n'hellent argoulaoui. Truez en eus ouz an diou dienez-se... Dastum a ray eta ar merc'hed yaouank-se hag heb eur gwenneg, hep skoazel, harpet hepken war ar Brovidanz divin a vag laboused an nenv hag a wisk lili ar parkeier, e westlo anezo da servij ar beorien, ar glanvourien hag an an dud en o zremenvan.

« Abaoue ouspenn kant vloaz 'zo, e kendalc'h ar burzud. Ar c'halvedigeziou a zo aet war gresk ; tier an Druéz — pemp hag hanter-kant anezo — a zo skignet e Franz, er Beljik hag e Bro-Saoz, hag eun abaden 'zo, en dro da Bariz.

« Ne glask al Leanezed umbl nemet gloar Doue, silvidigez an eneou ha mad ar glanvourien ; war ar marc'had e teu d'ezo an traou all. Ervez o Reolen ne c'houlennont morse netra. Dont a reont a bep korn eus Franz, meur a hini eus ar Beljik, eus Bro-Saoz hag eus an Irland. Er bed e oant a bep stad. Gant ar memes mall e vez digemeret en Druéz merc'hed yaouank pinvidik ha re baour. Meur a wech int deut e kevret da azeza war skigner an Novi-

siad. N'eus kemm ebet mui etrezo ; parezed ha c'hoarezed int kement ha ma hellont e karantez ar C'hrist.

« Evel argoulou ne c'houlenner diganto nemet bolontez vat ha devosion. O lakat kemm etrezo n'eus nemet ar vertuz.

« Klevet o deus holl e goueled o ene mouez Hor Salver : « Guel, va merc'h, ar glanvourien dilezet, an trubuilhou niverus hep konfort, an eneou doaniet war-nez fallgaloni ha mont da goll ; kea da rei skoazel d'ar re a zo er boan ; bez' ez int va mignoned, va breudeur, ro d'ezo da labour. Zoken er bed-man e kavin an tu da rei d'it eürusted er sakrifiz ha da asrei d'it kant gwech muioc'h eget n'ez pezo roet d'in. Bez' e vezin, me va unan, da rekompantz, bras meurbet. »

« Klevet o deus, a-dreus ar c'hantvejou, o tont betek enno komzou Hor Salver bepred gwirion : « Gwelloc'h eo d'eoc'h mont d'eun Ti a boan eget d'eun ti a blijadur. Barnet e vezoc'h ervez m'ho pezo barnet ar re all. Kalz e vezo pardonet d'an neb en devezo karet kalz. Eürus an dud truezus, rak truez en devezo Doue outo. »

« Gouzout a rae al Leanezed en em westlet da Zoue er beorien hag er glanvourien ez eo aet Hor Salver Jezuz Krist kalz pelloc'h c'hoaz, betek ober unan ganto : « Ar pezh ho pezo graet d'an distera eus va breudeur, d'in-me eo ho pezo her graet. »

« Hag ez eont, bepred brokus, o sonjal er bromesa konfortus roet gant Hor Salver da sant Yann-Doue : « Yann, evidon e kemeran an holl vad a rez d'ar beorien. O gouliou a zo va re ha d'in-me eo e walc'hez va zreid pa walc'hez treid da vreudeur. »

« Al leanezed-se ken kuzet, o guelout a reomp skedus a deneridigez hag a garantez : « Bez' ez pezo bugale ha n'ez pezo ket ganet hag anvet e vezi ganto o mamm. » Ya,

mammou int, « ar servijerezed feal-se karget da ranna d'ar mare ar poezellad winiz » ; mammou int, ar merc'hed souezus-se a laka pep bloaz etre divrec'h Doue kement a vugale dianket salvet gant nerz ha douter o c'harantez. Da hanter-kantved bloaz unan anezo, e nivere al Leanezed an nozveziou tremenet ganti e tal guele ar glanvourien hag an dud o vervel, hag e kavent 5.500 nozvez.

« Breman zo eun nebeut bloaveziou, e Asiz, e peden dirak korf santez Klara, er gouent ez eo beilhet atao gant he merc'hed ; em spered e teue eur ger dudius lavaret ganti en he zremenvan d'eun Tad a Urz sant Fransez a oa war he zro : « Va zad, peseurt kelou hoc'h eus a Zoue ? »

« D'allojouez a Leanezed an Druez ha d'ar c'hrignoliou, da gement lec'h ez int galvet gant poan an dud, evit deski d'an eneou doaniet e paourkeas korfou reuzeudik « eun dra bennak a nevez eus an Aotrou Doue ». Aslav-arout a reont dre o buhez penn da benn : e garantez, e vadelez, e druez hep termen. Hada reont karantez evit eosti eneou. Evel ar C'hrist e karont ar paour. Enno e velont anezan ; evito e reont ar sakrifiz a bep tra.

« E sakrifiz en em ro Leanezed an Druez, gant levenez, evit o c'hlanvourien hag o feorien ; da genta ez eont, hel lavaret hon eus dija — ervez ar Reolen ez eo o dever — d'an dud ar muia dilezet, ar muia reuzeudik, d'ar re a zo war-nez koll o ene. Ne spontont na dirak an nozveziou-beilh, na dirak ar c'hlenvejou pegus. Hag ouz o guelout bepred o vousec'hoarzin, bepred dous ha seder, ez eo teneraet kalon ar c'hlanvour gant kement a garantez ; gouela, pedi, distrei ra da Zoue. Al leanez, hi, echu he labour e kichen unan, a red da gichen unan all evit e barea hag e savetei. Ne sell ket outi stad ar c'hlanvour er bed, ne vel ennan nemet an Hini a zo deut dre e vuhez

dreist-natur da veza buhez he buhez: Jezuz Krist. »

Etouez an eneou dibabet-se, en Urz kaer ha sperius-se edo Monik o vont.

D'an 19 a viz here, aotreet d'ober he sakrifiz evit ar glanvourien hag ar beorien, e kemeras merc'h hena ar major Deleru hent ar gar, gant he zad; falvezet e voe gant heman he lakat e-unan etre daouarn Superiorez Mons, an hini a dlee kas anezi da Novisiad Seez.

War ar c'hae e chomas ar major betek loc'h an train, c'hoant gantan ampell ar muia gwella ar c'himiad diweza.

Ha d'an 20 a viz here 1927 e taolas Monik eun troad dichek dreist treuzou an Druez, gant ar volontez d'en em rei da Zoue ha d'ar beorien evit Doue: betek ar maro...

Sellomp outi o sevel.

V

En eun doare karantezus ez eo digemeret Monik gant ar Vamm jeneral hag ar Vamm Mestrez an Novisiadezed. An digemer c'hoek-se a denera he c'halon; n'eo ket souezet koulsgoude, rak anaout a ra madelez he Mammou nevez dre vadelez ken bras Mamm X..., Superiorez Mons. Hep dale ez a d'ar japel, da heul he Mammou, evit ober ar c'hiz, hag eno, o koueza d'an daoulin, e reas Monik d'he Mestr muia-karet an donezon anezi he-unan: « Setu me aman, o va Doue, evit ober ho polontez. »

« Setu me aman! » o ya, setu hi gant he mennadou nerzus, gant he holl bolontez da vont betek penn ar sakrifiz, betek penn ar garantez. « Setu me aman! evit ho kloar, o va Jezuz, evit ma teuy ho rouantelez, evit ma vezoc'h muioc'h karet, gwelloc'h servijet, evit ma reoc'h ho pennoz d'am zud vat... »

Er c'homzou-se en em goll ene Monik: « Setu me aman! » Lavarout a reas d'unan eus he mignonezed santimanchou he c'halon da eur boanius ar c'himiad: « Va mignonez karet, kalet eo bet ar sakrifiz, met an Aotrou Doue a ro ar c'hras a zo ret evit hen ober. Eürusoun en eun doare divent. Ennon e ren ar peoc'h. »

Koulsgoude ne gemeras ket c'hoaz Monik he lec'h en Novisiad. En Druez ema ar c'hiz da lezel pemzek deiz ar plac'h yaouank e porched an Templ; epad an amzer-se ez eo fiziet en eul leanez hag a zesk d'ezi ar pep brasa eus ar Reolen, petra eo eul Leanez a Druez, peseurt devosion a vez graet er gouent. Hed an amzer-se n'eo nemet « huanderez » — *Aspirante* e galleg.

Alies e vez neuze nec'het ar merc'hed yaouank savet keuz ganto d'o familh; awechou zoken e vez evito stourmajou rust, touellet ma vezont da sellout war o c'hiz. M'en

devoe Monik da stourm, ne voe morse touellet da sellout war he lerc'h. Graet ha graet mat e voe bet he sakrifiz...

Inouet e voe koulsgoude d'ar penn kenta ha nec'het ha souezet e voe. Hi, ken kalonek, boazet da chom pell en iliz, met boazet ivez da labourat, a ginnigas moug. dindan ar Reolen, e kreiz an traouerez a veze laketa d'ober, evel gwriat, skuba.

« Ar bed a c'hoarsfe dirak an oberou dister-se, mil ha mil anezo, hag a wask pa vezont graet mat, hag epad hir amzer, eun natur dishual evit rei d'an ene ar peoc'h hag al levenez leun. » Kalet e voe ar c'houriz evit Monik.

Goude eun nebeut derveziou, e kavas ar Vamm enorus anezi e toull dor ar japel, stenn he dremm.

« Petra zo 'ta, Monik? Ne' z a ket mat an traou? »

— O va Mamm, n'en em anavezant ket ken!

— Gwir eo, n'oc'h mui ar memes hini, n'oc'h mui Monik Deleru, met danvez eul Leanez a Druéz. »

Hag, evel ne zistenne ket he dremm: « Ha sonj ho poa da genderc'hel en Novisiad buhez an amzer dremenet? E vije kemennet d'oc'h gant ho Superiorezed sevel war varc'h pe varc'h-houarn evit mont da brezeg e kêr? »

— O nanu! gouzout a raen mat petra oa ouz va gortoz; met ne greden ket e vije ken start!

— Kement-se e koust beza Leanez an Druéz; eur mousc'hoarz, Monik.

— Mousc'hoarzin a ran. emezi, met aet oun skuis. »

En dra d'ezi koulsgoude n'hellas den guelout he bolontez o plega. Poan en eus, stourm a ra, met gouzout ha santout a ra beza war an hent mat... Deut eo evit-se.

Ha war eur paper skrivet ganti e kavomp er penn kenta ar goulenn-man: « Mar tlefen mervel en noz-man, penaos e karfen beza tremenet an dervez? »

Ouz ar sklerijen-se n'hell ket Monik fazia...

Neuze e teu sonj d'ezi eus goulenn Sant Bernard outan e-unan evit kreski e aked hag e spered a sakrifiz en e vuhez el leandi: « Bernard, perak out-te deut aman? » Perak e oa deut d'ar gouent, Monik her gouie ha dre eno ne gile ket dirak ar boan hag ar stourmad.


« Arabat d'in chom etre daou, a skriv-hi. Ober va dever penn da benn, holl deveriou va galvedigez ar gwella ma hellan... »

« *Va dibabet en eus Doue.* » Eul linen zo bet laketa ganti dindan ar c'homzou-se ha goude e skriv c'hoaz: « N'hell ket Doue rei brasoc'h gras d'eun ene eget tenna anezan d'ar gouent. »

Setu tremenet ar pemzek dervez harlu. Ema an eur da vont en Novisiad. Digoret eo an nor dirazi gant he Superiorezed. Gant lealded e tavar Monik d'ezo he stourmajou, he santimanchou, he c'hoant krenvoc'h krenva da veza eus an Urz hag al levenez laketa gant Doue en he enc evel eur rekompant eus he sakrifiz. Digemeret e voe neuze er familh vras evel « Goulennerez » — *Postulante* e galleg.

Niverus e vez atao ar Goulennerezed hag an Novisiadezed en Druéz; morse niverus awalc'h, siouaz! evit konforti an holl dud reuzeudik ha diazeza tier nevez goulennet e pep tu!... Resevet e voe eta Monik en o bandenn devot ha seder. Diwar neuze e heulias eksersisou an Novisiad, o pourchas ar vuhez a relijion hag o c'hortoz ar wel wenn hag ar wiskamant a verko he gwestl abenn meur a viz. Reolen eur Goulennerez hed eun dervez en Druéz, skrivet gant al Leanez Jozefa, abostol Cherbourg, a hentcho hag a sikouro ac'hanomp da vont da heul Monik en he buhez nevez.

Da bemp eur e son ar c'hloc'h evit ar wech kenta da c'hervel an eneou d'ar beden. Evel ma 'z eus bet lavaret d'ezi en Novisiad, e ra Monik sin ar groaz, e kinnig he



MAISON-MÈRE. — Vue Général

c'halon da Zoue hag e wisk buhan he broz dister, he mantel hir hag he boned gwenn. D'he c'hrusifi e pok, hag hep mar ebet ec'h aslavar da Jezuz ar c'homzou karet : « Setu me aman evit ober ho polontez ! »

D'an eil taol kloc'h, eo ret disken d'ar japel... Didrouz ez a hed ar mogeriou gwenn kann, eürus, peoc'h an ti o respont e pep lec'h da beoc'h he ene.

Er japel e pleg he glin a-raok mont betek he c'hador kolo. War an Tabernakl e par he sell goude beza tanvaet gened al lec'h santel. Pet gwech ne dleed ket he c'hlevout o lavarout pa sikoure Leanez ar sekreteri : « Ha ! va japel gaer ! »

Da bemp eur hanter e lenn eun Novisiadez a vouez uhel pedennou ar mintin gant an orezon warlerc'h ; pennad amzer dudius hag a ra d'an ene ankouât pep tra evit sonjal en Hor Salver. Ervez sant Paol, « an neb a zo unanet gant Doue ne ra gantan nemet eur spered », hag ervez sant Gregor, « lojeiz Doue eo ene an den santel. »

Ret eo d'an Novisiadez evel d'al Leanez kaout er vuhez eul lec'h da ziskuiza, da grenvât, d'en em laouenât ha da bourchas oberou mat. Al lec'h-se eo Kalon Doue e-unan. Ennan eo en em goller evit en em gaout hag evit beva outan.

« Da c'houec'h eur ha kart e kinniged sakrifiz santel an oferen. Aze, en eur gomunion virvidik, e kemer an ene nerz da stourm, glanded da sklerijenna, groez da entana...

« N'hen ankouait ket, a lavare sant Visant a Baol d'e verc'hed, mar fell d'ec'h kaout an nerz-kalon ho pezo bepred ezomm outan, it da gomunia, it da gomunia ! P'en em ro Doue en e bez, nag aes ha dous eo en em rei d'ar paour, e skeuden ! »

« Komprenet eo ar c'homzou-se en Druetz, rak eno e

vag al Leanezed o c'harantez evit ar beorien e karantez Jezuz-Osti. »

Da seiz eur, ez a Monik da zebri gant he c'hoarezed. Er sioulder e vez kemeret an holl brejou.

Neuze hell an ene en em laouenât. Hini Monik a dridas dirak ar baourentez-sè en doa kement c'hoantaet ranna gant ar beorien hag a zo breman he lod. « Berniet eo al listri teo an eil war egile ; didammet int alies met krenv awalc'h c'hoaz evit herzel ouz ar stokadennou a dapont pa dremenont dre zaouarn re nervennus...

« War ar memes linen eo renket ar picherou pri, o dorn troet da zisken chistr e guer ledan diaes da garga pa servijer al Leanezed. He flas e kemeras Monik war ar skigner koad gwenn ez eo ret o finval goustadik, hep trouz, pe lezel anezo re-bell eus an daol voued mar n'oad ket bet buan awalc'h d'o zostât.

« N'eo ket brao an traou-se marteze, met mat int evit an ene.

« Hep dale, e sal vras an Novisiad, elec'h m'eo aet Monik gant ar re all, e vod ar Vamm he bugale en dro d'ezi evit rei da bep hini he labour.

Da skuba e nij lod, lod all da walc'hi al listri pe da c'hriat. Bez' o deus holl eun dra bennak d'ober ; ar re n'int deut nemet eun nebeut derveziou 'zo a red da heul ar re all, hep roestla kuden ebet.

« A hed an deiz ez eus eun amzer merket evit kenteliou Istor santel, katekiz, medisinerez, hag evit prezegennoù ar Vamm mestrez an Novisiadezed diwar benn deveriou bras buhez eul leanez.

« Da greisteiz nemet kart en em gav an holl er japel, Goulennerezed, Novisiadezed, Leanezed, evit ober o eksamin. Kontet e vez al lammou evito rapari.

« Da greisteiz, lein. Da c'houde, diskuiz. Ha ! richan an

Novisiadezed ! Levenez an eneoù glan hag ar c'houstiansou e peoc'h, o frizout ec'h ouie Monik.

« Da ziv eur nemet kart, e tistro ar sioulder hag al labour, hag e krog ennan Monik en eur boania da veva bepred muioc'h dindan lagad he Mestr adoret. En em gaout a ra adarre ehars e dreid da ziv eur hanter evit ar japeled dirak ar Sakramant. Da c'houde, dao adarre d'al labour.

« Da beder eur hanter, ema al lennadeg santel dirak an Novisiad a-bez, ha diouz an abardaez, ervez an derveziou, en em adkaver er japel evit ofis ar Werc'hez Vari, pe evit an eur santel, pe evit hent ar groaz.

« Warlerc'h an diskuiz goude koan, e vez graet e kevret er japel ar pedennou diouz an noz ha pourchaset orezon antronoz vintin hag e peoc'h, er glanded hag er garantez e kloz an dervez.

Breman e hellomp heulia Monik kammed ha kammed en he buhez ; he notennou a lavaro d'eomp stad he ene.

« Va dervez hirio.

« Hirio, pasianted, va ene ! Ar pezh a blijio da Zoue e vezo warc'hoaz. Da c'hortoz greomp e volontez.

« Tremenet eo deac'h .. Hag eus ar pezh am eus gouzanvet d'eac'h ne chom ganin poan ebet. Ganin e chomfe merit mar am ije he c'hinniget da Zoue.

« Hirio e fell d'in poania gant merit, o va Doue ! Hirio n'eo nemet eun dervez hepken. Nebeut a dra eo hirio... Va Doue, hag ober hellan nebeutoc'h eget kinnig d'eoc'h poaniou ha skuisder eun dervez hepken ? Ra vezo poaniou an dervez hirio, o va Mestr divin, holl evidoc'h, evit ho karantez ! O c'hinnig a ran d'eoc'h dre Galon dinam ho Mamm santel. »

Poueza ra, her guelout a reomp, war an devez d'en em santelat d'an eur a vremen, oc'h ober al labour zo d'ober. Skriva ra c'hoaz komzou ar C'hardinal Mercier, den santel

ha kalonek ar Beljik : « Youl an den a diz al labour zo d'ober breman. Lezel Doue da labourat ennomp ha senti pa gemenn, setu reolen buhez ar c'hristen. »

Poania ra da heulia ali an den eürus Grignon de Montfort : « Pa gavit an drubuilh war hoc'h hent, lavarit : bennoz da Zoue ! Va Doue, ho trugarekât a ran ; da c'houde kuzit e truez Doue ar groaz hoc'h eus gounezet ; ha neuze ne sonjit mui enno nemet evit lavarout : bennoz bras ! »

Kaout a reomp c'hoaz an notennou-man eus an amzer-se. Ger an abad brudet, Rancé, en eus skoet he ene kalonek :

*Beva, hep beva 'vel sant,
A zo beva 'vel diskiant.*

hag en em anaout a ra e komzou Lacordaire : « Bez' ez eus eneo hag o deus ezomm d'en em rei ha n'int eürus nemet eus an eürusted a roont. »

« Va galvedigez a zo dont da veza eur santez, a lavar-hi gant santez Tereza ar Mabig Jezuz, met ne fell ket d'in beza eun hanter santez. N'am eus aon nemet eus eun dra, aon da zerc'hel d'am bolontez va-unan. Kemerit anezi, o va Doue, rak me fell d'in ar pezh ar fell d'eoc'h. »

« Kousto pe gousto, eur santez a fell d'in beza, hag evit-se chom atao unanet gant Jezuz, mat bepred e kenver an holl. »

« Sikourit ac'hanon, va Jezuz, da gaout eur spered a feiz, eur volontez start ha padus, eur garantez divent evidoc'h hag evit va nesa. »

Eur beden verr, aozet gant santez Jertrud, a dleas dont alies war vuzellou Monik, devot bras d'he Mamm eus an nenv : « Me ho salud, Mari, Gwerchez dinam me westl d'eoc'h va ene a-bez. »

Skrivet en eus c'hoaz en amzer-se al linennou-man dudi ha doun ; « Ret eo bleunia el lec'h m'en eus Doue

hadet ac'hanomp ! Kemz leun a zouster, a beoc'h hag a sklerijen... O va ene paour, dre eun taol a Brovidanz Doue emaout er stad-man, en Ti-man, gant ar yec'hed-man, eo ret d'it plega d'al labour a skuis hag a vrev ac'hanout dre m'eo padus ha diaes. Doue n'eo ket eun hader hag a lez ar greun da vont gant an avel aman hag ahont war an douar gleb pe war an treaz dizec'hed. Doue eo an hader a bourchas an ero evit teurel enni d'an eur vat ar c'hreunen a fell d'Ezan lakat da ziwan. O ! ne c'hrosmol ket, va ene, al lec'h emaout ennan eo an hini a zere ouzit, al lec'h dibabet ha pourchaset evidout gant an Aotrou Doue. Lagad Doue a sell ouz ar c'hreunen a ziwan, a sav, a gresk hag a ra deliou, hag ervez he natur hag ervez he ezommou hag ervez ar pezh a c'hortoz eus da berz, planten vihan zister. Awechou e laka en dro d'it drein hag a gavez kris ! Planten vihan, da ziuall ha da zifenn a ra diouz an amprevan a stlabesfe ac'hanout. Awechou e laka en da gichen eur gward hag a gavez diaes ha kalet. Planten vihan, da ziuall a ra eneb an avel a blegfe hag a dorrfe ac'hanout. Awechou e kuz ac'hanout en disheol hag e vir ouzit da ziskouez da liou skedus. Planten vihan, ar goabren-se a zalc'h da c'hlanded, da sked, da c'houez vat. Ne c'hrosmol ket, o va ene, kement a c'han, a vev hag a gresk endro d'it a zo laket aze evit da eürusted gant dorn an Aotrou Doue. Bev e peoc'h, zoken er boan. Bleunia rez evit an nenv. »

« Doue eo ar perc'hen fur, ijinus ha ne chanj ket lec'h hep digarez d'eur wezen hag en eus kresket hag a zo boazet el lec'h ma voe bet hadet gwechall hag a grede d'ezi mervel el lec'h m'en eus bevet. Ha pa zeu, en e furnez, da chanj lec'h d'ar wezen, o ! gant pebez douster a vamm n'her gra ket ! Gouzout a ra eo poanous dougen da lec'h all an nemorant eus eur vuhez roet a greis-kalon. Anaout

a ra ar gwrizioù a stag ar wezen ouz an douar, hag ar gwrizioù, daoust d'ezo da veza dister, a zo krenv kouls-goude. Doue ne droc'h ket anezo holl, met hepken ar re a virfe ouz ar wezen da gregi ha da staga e lec'h all.

« O ! ne c'hrosmol ket, va ene ; ne grede ket d'it beza goest da veva pell diouz bro da gavel. Kea !... C'hoaz e lez Doue ganit da c'halloud da garout, da nerz d'en em staga, d'en em rei, hag al levenez da veza c'hoaz karet. Kea, dalc'h sonjou ar gèr, met hep da zizec'ha ; hag evel en da yaouankiz, gouez adarre bleunia. N'eo ket awalc'h plega, ret eo bleunia, da lavarout eo beva eürus ha rei eürusted d'ar re all. Bleunia evit ar blanten a zo diskouez he gened, rei he c'houez vat, tenna warni ars ellou, chacha warni ar wenanen ha kinnig d'ezi ar mël a glask, rei fizianz a frouez vat abenn an diskar-amzer. Bleunia evit dout, va ene, eo diskouez ez out laouen, laouen evit kement a vez graet d'it, laouen eus al labour a vezo goulenet diganez eun dervez. Bleunia ! en em rei en-dro d'it dre da gomzou ha da zremm skedus. « Mat emañ ganeoc'h... c'houi zo ken mat !... » Bleunia zo beza prest d'en em rei d'an holl, gouzanv beza diaezet, en em ginnig da gement a hell ober plijadur d'ar re all, digemer pep tra eus o ferz hep diskouez morse beza skuis hag inouët.

« Nag a nerz, nag a beoc'h, nag a sakrifiz, nag a santelez ne c'houlèn ket ar gomz-se : ret eo gouzout bleunia el lec'h oc'h bet hadet gant Doue. O va ene, bez ar blanten-se a ro joa, enor ha levenez Doue. Bez penn-kil-ha-troad d'an Hini a zo holl d'it. »

En amzer-se e skriv c'hoaz Monik an aliou-man, ken fur ha ken brao doareet eus he c'halon dener :

« Ho kalon gwiridik a zo eun eienen a boaniou ha n'int na prizet na guelet. N'hellit ket en em galedi evel a garit, arabat beza nec'het. Bezit kentoc'h laquen da gaout eun

eienen a groazioù. D'ar santelez ho savo ar wiridigez-se.

« Peurvuia eo eun ene gwiridik kizidik, digor da draou an nenvou ha da c'hras Doue. Seulvui e tiwask poan, seulvui ez eo goest d'en em sakrifia. Falvezet eo gant Doue lezel ho kalon da veza gouliet ; pa noc'h ket evit mirout ouz ar gouliou nag o farea nag o ankouât, poanit da rei d'ezo eur vertuz dreist-natur ; guelit enno evel delezioù da sevel d'ar santelez. Lavarit ennoc'h hoc'h-unan : va gwiridigez, mar reizan anezi ervez ar feiz, am dougo d'ar santelez, gwella-se, met ganti emañ war var d'ober kalz a bec'hejou bihan mar lezan anezi da redek e parkou ar santimanchou gouliet... Ne c'hoantait ket kaledi ho kalon, dalc'hit ho kwiridigez, met grit outi implij vat : mirit outi da stourm ouz grasou Doue.

« Ne bouezit ket ar rebechoù a vez graet d'eoc'h. Pouezit an drouk a rafe d'ho koustianz guelout dismegansou e pep lec'h. Ne vezit ket nec'het o velout ho santimanchou o chom da virvi, n'eo ket eur merk ne rit netra en o eneb. Skler eo eta e fell d'eoc'h trei ho kwiridigez wardu Hor Salver. Lakit anezi da ledanât ho karantez evitan, da gompren gwelloc'h penaos n'oc'h ket graet evit traou an douar, ha da glask e Kalon Jezuz hepken ho frealzidigez eneb d'ar poaniou en eus diwasket e-unan. »

Evit en em gennerzi e skriv Monik : « Heulia ran ar Reolen ar gwella ma hellan, raok petra am befe aon ? »

O vont gant an hent-se n'eus aon ebet da gouat ; mirout a ra mat ar Reolen, ar Reolen he miro.

VI

Kendalc'homp da bennaoui e park ar Goulennerez nevez. Fur ha poellus eo he notennou. Diskouez a reont he bolontez da chom krenv ha troet atao wardu ar pal : beza eur santez... Eviti n'eo ket an dra-se kaoziou ; poania ra, e gwirionez, da veva ar pezh a skriv.

« Ren eur vuhez e kevret en eun doare d'in va-unan ; ober en diavaez evel an holl hag en diabarz evel den all ebet. Kuzat dindan eur mousc'hoarz poaniou, sakrifisou, pinijennou. Kuzat dindan eun dremm umbl ar pezh a hell ennomp trec'hi ar re all. « Tevel a ra e gwirionez ar pezh a hell he lakat da dalvezout heb ober vad ebet d'ar re all. Goude he maro e voe kavet en he fres edo louzaouerez eus ar Groaz-Rus. Morse n'en doa Monik komzet eus an dra-se, hag epad he Novisiad ne glaskas ket ober muioc'h eget ar re dizesk war ar poent-se. Morse ne gontas d'he c'hoarezed ar beajou kaer graet ganti, plac'h yaouank, e Franz hag er broiou estren. Ha mar komze hini pe hini eus he beajou, ne dilouras ket Monik eur ger diwar-benn he re ; ne ouied nemet e oa-hi bet e Lourd.

Ha pet gwech e kavomp dindan he fluen :

« Diouall diouz ar pezh am laka da dalvezout.

« Piou oun-me evit kemer lorc'h gant an distera tra ?

« Mousc'hoarzin d'ar poaniou dister...

« Mousc'hoarzin muioc'h pa vezin dismeganset, inouet, gourdrouzet hep digarez. Digemer ha reseo pep tra gant an dudiusa mousc'hoarz...

« Mousc'hoarzin d'ar c'hontroliezoù.

« Beza brokus kenan en traou bihan...

« N'eus ket umilite hep dismeganz...

« Pa garer, ne goust netra...

* * *

Kenteliou an Novisiad a zo maen-diazez buhez eul leanez, a skriv-hi. Seulvui e lezimp labourat ennomp, seul startoc'h e vezo hor buhez relijius. Jezuz, Doue an nenv, am dibab evit e bried. Petra ne ra ket eur plac'h yaouank eus an douar evit plijout d'an hini a vezo he fried evit ar vuhez. Dibabet oun n'eo ket gant eun den, met gant Doue ; en em brepari ran da veza pried Jezuz-Krist. Mar labour kement eur plac'h yaouank evit pourchas ar briedelez, petra ne dlean-me ket ober ! Amzer an dimezi eo evidon an amzer-man... Seulvui en em roin da Zoue, seulvui en em lezin da veza labourer gant kenteliou an Novisiad, seul brokusoc'h e vezin, seul gaeroc'h e vezo va ene, seul dudioc'h e vezin kavet gant va fried divin. Al labour-se a goustod in haga c'houlennno diganin sakrifisou. O va Doue, c'houi hoc'h eus kement gouzanvet evidon... Penaos e hellfen klemm eus va foaniou dister, desket hoc'h eus d'in poania. Ra zeuy sonj ar c'hroaziou hag ar poaniou tremenet d'am c'hennerzi evit dougen ar poaniou dister-se unanet gant ho re. Holl vuhez al leanez a vezo ar pezh e vezo graet en Novisiad. Mestr mat hag hoc'h eus roet d'in al loden wella, en em rei ran d'eoc'h ; roit d'in ar c'hras da lakat va Novisiad da dalvezout kement hag hoc'h eus c'hoant.


N'eo ket huvreal a ra Monik, met labourat. Fellout ra d'ezi beza santel, kemer an hent merket d'ezi evit tizout ar pal : evez warni he-unan ha karantez. En notennou skrivet ganti bemdez diwar-benn al labour d'ober hag ar sonjou mat da lakat en he fenn kemeromp ar bokedou-man hed eur miz. D'eomp e tiskouezint ar boan kemeret gant Monik evit en em santelat.

(Seiz miz 'zo ema Monik en Druéz.)

1^o mae 1928. — Bloavez eürus : Douster.

D'ober. — Mousc'hoarzin d'ar pezh a nec'h ac'hanon.





MAISON-MÈRE. — Extérieur de la Chapelle

Da sonjal. — Awalc'h am eus gant Doue. (Merka a ra dre kroaziu bihan pet gwech e sonjas er boked-se.)

2. — Mousc'hoarzin d'ar pezh a ra diaez d'in.
— Ennon e vev Doue ha me ennan.
3. — Mousc'hoarzin d'ar Groaz.
— Kroaz eürus !
4. — Beza brokus gant va finijennou bihan...
— Unaniez gant Doue.
5. — Fealded vras en traou bihan.
— Ganeoc'h emañ betek fin ar c'hantvejou.
6. — Diouall diouz ar bihana plijadurioù.
— Talvoudek eo evidoc'h ez afen kuit.
— D'ober epad ar sizun. — Digemer ar rebechoù ha labourat dre garantez evit Doue o sonjal ez oun ar falla hag e veritan an dismegansou bihan-se evit kastiza va lorc'h.
Poent ar pennad : Peoc'h war gement a ouezan.
7. — Beza brokus gant va finijennou bihan.
— Sioulded.
8. — Ober kalz a binijennou bihan en eur vouse'hoarzin.
— E disheol ar feiz m'ho kar hag hoc'h ador, o Jezuz evit ho kuelout e c'hortozan ar mintin.
9. — Seul diaesoc'h e vezo d'in eul labour, seul-vui e karin anezan.
— E disheol ar feiz m'ho kar hag hoc'h ador,
O Jezuz ! evit ho kuelout e c'hortozan ar mintin.
10. — Digemer en eur vouse'hoarzin an dismegansou dister...
— En noz tenval a guz ac'hanout ouzin, o Jezuz, me fell d'in diskouez d'eoc'h va c'harantez dre ar wella fealded.
11. — Beza brokus en traou dister.

- Sec'hor venniget ha ne ginnig netra d'ar fouge.
12. — Mousc'hoarzin d'an nec'hamanchou bihan.
— Er groaz evel el levenez, me da gar evidout da-unan, o Jezuz.
13. — Kastiza va doare beza e pep lec'h.
— Piou oc'h-c'houi, va Doue, ha piou oun-me evit mont dirazoc'h ?
D'ober epad ar sizun. — Digemer en eur vousec'hoarzin an nec'hamanchou bihan, ar sakrifisou hep morse diskouez, zoken dre an dremm, ez oun nec'het tamm ebet.
Poent ar pennad : Pasianted sioul eienen a santelez.
14. — Fealded vras en traou distera.
— Aotrou Doue, c'houi hell pep tra, bezit truez ouzin rak n'oun nemet eur bec'herez.
15. — Ober kenan-kenan piniennou dister.
— Ret eo pedi bepred hep morse ehan.
16. — Mousc'hoarzin d'an nec'hamanchou bihan.
— Klaskit da genta rouantelez Doue, roet e vezo d'eoc'h an nemorant war ar marc'had.
17. — Ober traou dister, eus an druilh, evit Doue hepken.
— Sursum corda ! Uhel ar c'halonou !
18. — Ober eur bern sakrifisou kuzet, netra nemet evit Doue.
— Eur c'hrograd eo ar vuhez, en nenv ema ar viktor.
19. — Beza brokus meurbed en oberou vertuzus kuzet.
— N'en em ziskouez Doue nemet d'an ene sioul.
20. — Diouall mat diouz ar sonjou goullo.
— Deus meus et omnia ! Doue ha netra ken !
D'ober epad ar sizun. — Pellât diouzin ar sonjou n'int ket karantezus. Kaout an tu d'en em ziskouez seven ha madelezus e kenver va holl c'hoarezed ha guelout Jezuz enno.

- Poent ar pennad : Ar garantez etre c'hoarezed. Eul Leanez a garantez a dle beza karantezus evit he c'hoarezed a-raok her beza evit ar glanvourien. N'eus ket a garantez hep sakrifiz.
21. — Ober mat va holl oberou evit Doue ne vern pegen dister int.
— *Veni, Sancte Spiritus*. Deuit, Spered Santel !
22. — Digemer en eur vousec'hoarzin an diaezamanchou dister.
— *Veni, Sancte Spiritus*. Deuit, Spered Santel !
23. — Ober pep tra hep sonjal ennon.
— Deuit, Spered a furnez... Ar pezh n'eo ket evit Doue a zo eneb da Zoue.
24. — En em ziskouez seven kenan gant ar re a ra diaez d'in.
— Deuit, Spered Santel, en em rei ran d'eoc'h hep dere'hel netra ganin va-unan.
25. — Fealded vras en traou bihan.
— Krena a zo kemer eun hent fur.
26. — Beza brokus e pep tra evit pourchas donedigez ar Spered Santel.
— Hepdoc'h n'hellan netra.
27. — Chom hep koll tro ebet d'en em sakrifia.
— Deuit, o Spered Santel, leunit kalonou ho tud fidel hag enaouit enno tan ho karantez.
Pantekost. D'ober epad ar sizun. — Em labour hag em holl oberou pellât pep plijadur, pep aezamant. Klask ar pep diaesa, ar pezh a blij d'in an nebeuta.
Poent ar pennad : An traou a vir eus ar garantez etre c'hoarezed.
28. — Ober mat-rus an traou distera dre anaoudegez vat evit ar Spered Santel.
— Spered Santel, diouallit hoc'h-unan ho tonezonou ennon.

29. — Ober epad an dervez-man evel pa vefe an dervez diweza eus va buhez.

— Ar vad am bo graet hed va buhez am difenno e lez-varn Doue.

30. — A-raok kregi el labour goulenn ouzin va-unan ha douget oun d'hen ober gant ar Spered-Santel.

— Deuit, Spered Santel, taolit er-maez eus va c'halon ar pezh a zo eneb d'eoc'h.

31. — Lealded vras en deveriou bihan.

— Spered Santel, rentit ac'hanon feal d'hoc'h aliou diweza.

An daolen-se a ziskouez d'eomp labour pemdeziek ene Monik ; bemdez gant ar memes bolontez, e taolo evez, e trec'ho, e kemero poan evit tizout ar pal : beza eur wir leanez, karout Jezuz kement ma heller karout, hag hen diskouez d'ezan en eur vervel d'hor bolontez dre ar sakrifiz ha dre ar fealded d'an deveriou bihan...

A hed skridou Monik e kavomp ar memes noten...

Komprenet en doa, Goulennerez ha diwezatoc'h Novisiadez, e oa he c'henta dever ober gant fealded ha gant eur garantez virvidik he deveriou bihan.

« E gwirionez, n'eus oberou an den nemet an dalvoudegezh a laka Doue enno. » Ha dre ar fealded-se d'an traou dist, dre vil sakrifiz kuzet, e heulie Monik hent santez Tereza ar Mabig Jezuz.

Pet gwech ne gavomp-ni ket hed an amzer-se ar volontez da veza bemdez feal en deveriou bihan, d'en em sakrifia pep tro ma kavo an tu, da ziuall diouz pep plijadur... Pouezomp ar gerioù : « diouall diouz pep plijadur ». Pebez maro d'he bolontez dindan ar c'homzou-se!...

Hag ar re o deus anavezet natur kizidik Monik a gompren betek pelec'h e fellas d'ezi klask ar sakrifiz a ro taol ar maro d'ar volontez hag a ra beva e Doue hag evit Doue.

* * *

Setu tremenet miziou. Lezet eo Monik da gemer ar wis-kamant. Hen embann a ra d'he zud karet. Ken mat e vezo o c'haout en he c'hichen gant Mari-Jenovefa en dervez benniget-se ! Gouzout a reont o merc'h karet eürus eus eul levenez ha ne ehan da gana en he holl izeri ; an eürusted-se, he gullet o deus o skedi war he zal pa 'z int deut d'he bizita epad ar miziou tremenet, he gullet a rint doun-noc'h c'hoaz d'an dervez benniget ma kemero gwiskamant an Urz... Embann a ra ivez he levenez d'unan eus he c'hendirvi, misioner Kalon Dinam Mari hag a gemere al lestr d'an 11 a viz gwengolo 1899 evit ar Mongoli ha ne zistroas d'an Europ nemet d'ar 7 a viz eost 1924. Krenv kenan eo al liamm a stag ar misioner ouz ar Goulennerez : eus ar memes gouenn eo o eneoù dispont.

Skriva ra-hen d'ezi : « 26 a viz gouere 1928 ; eürus oun evel-dout eus ar c'helou mat a zigasez d'in ; lakat ar wis-kamant a stago al liamm kenta etre Jezuz ha te. Nag eürus oun d'az kuelout e pal da c'hoantegeziou ; biskoaz n'am eus bet douetan war nerz da c'halvedigez ; kaer am eus atao kavet an nerz-kalon ec'h eus diskouezet hed pevar bloaz hir hag a gav breman e rekompanz. Chom bepred brokus : goude beza sakrifiet ar bed ha da familh, en em sakrifi da-unan. Bemdez e vezo ar sakrifiz-se d'ober ! Her gullet a ri en amzer da zont. Met bez sonj ez eo berr ar vuhez ha poagn d'en em santelat gant ar galon ec'h eus laket da heulia da c'halvedigez...

« Sell, n'eus nemet eum dra talvoudek war an douarman : ar silvidigez. Gullet Doue en Nenv, e garout, e veuli, adgullet eno ar re hon eus karet, ha n'eo ket brasa c'hoant hon ene ? Ha n'eo ket ar pezh a dleomp goulenn heb ehan digant Doue evidomp hag evito ? »

« Betek ar maro ha pelloc'h e kendalc'h eta hon emgleo a bedennou ; hag an hini ac'hanomp en em gavo da genta er baradoz a gendalc'ho da bedi start evit egile betek an eur ma velimp hon daou sevenet hor mennadou... Mar teufen da gemer adarre hent va mision e hellez kredi ez in da lavarout d'it « kenavo » en eur dremen ; kenavo, me lavar, e Doue, rak ne gredan ket kaout pell amzer da chom en harlu war an douar. Met arabat d'comp lakat liou du war lion ros da dremwell. »

Ne sonje ket an Tad misioner n'en doa Monik, leun a yec'hed, nemet eun nebeut miziou da dremen war an douar hag ez aje en e raok d'an nenv...

Houman a bourchase dervez he Gwiskamant gant muioc'h mui a galon hag en em lake er retred didrous d'ar 7 a viz guengolo 1928 evit dont outan d'ar 15, d'an dervez mil gwech c'hoantaet evit gwiska dilhad leanez.

VII

Ar re o deus heuliet Monik kammed ha kammed hag a zo en em staget eus he ene ken kaer a vezo eürus o lenn an notennou skrivet ganti epad ar retred.

Diouz ar mintin epad ar retred-se, en em laka Monik da genta dirak Doue ; fellout a ra d'ezi, e gwirionez, tremen an derveziou-se « he-unan gantan E-unan ».

« Beza dirak Doue, emezi, aze ema an eürusted » hag e chom dirazan.

« Doue e pep lec'h », hag ec'h en em goll ennan en eur ober eun akt a feiz : « Va Doue, me gred emaoc'h aman dirazon. »

« Digoret eo ar retred :

« 7 a viz gwengolo : komz da Zoue, selaou Doue, komz a Zoue.

« Sioulded an teod... an daoulagad... ar galon... ar skianchou... ar spered.

« Va buhez a dle prezeg an Aviel.

« Izeloc'h a galon e tle beza ar re speredeka rak muioc'h e tleont da Zoue.

« Bepred e tle an den beza prest da senti ouz Doue. Pa lavar Jezuz : ezomm am eus ouzit, e tlean den beza prest atao da respont d'ezan gant karantez : « Aotrou, setu me aman. » Bepred e tle beza war evez, bepred e tle beza karantezus evit ober eus e vihana oberou eur c'hantik a veuleudi. An dra-se e tle beza hor buhez. Dre ar c'hras e kemer ar relijion an den, korf hag ene ; met hor c'hemer a ra-ni, eneou relijius, en eun doare strisoc'h.

« Va Doue, c'houi eo va eienen. War an douar emaoun evit ho meuli. D'al leanez da veva eus eur vuhez divin nerzus ; eur veuleudi e tle beza he holl oberou : eur

veuleudi a garantez; eur veuleudi a sentidigez; eur veuleudi a boan; eur veuleudi a labour.

« En em dennomp dirak Doue dre garantez ha dirak hon nesa dre garantez evit Doue. En em zalc'homp mat ennomp hon-unan evit ma hello Jezuz dont e peb amzer.

« Ha ! ma lavarfen a greis-kalon, mintin ha noz : « Etre ho faouarn e lakan va ene » ! ec'h astennfen va daouarn da Zoue gant fizianz eur bugel. »

* * *

« Eur ar sioulded vras ! An eur evit Doue da ziskuiza e ene eul leanez dre m'eo dilezet gant ar bed. Ra vezo an eur-se eur Gouel-Doue ! Beza va-unan gant Doue hepken. Sioul eo pep tra : an natur, ar mor. Dalc'homp d'hor sioulded vras dre resped evit hon diweza noz. »

* * *

« Ar vuhez a zo cun hent hag a zistro da Zoue. Redek wardu ti an Tad hep koll eun tamm amzer. Ra servijo d'in pep tra da sevel ; ra vezo pep tra evidon eur skeul da vont betek Doue.

« O Aotrou, eus eur mell gras am eus ezomm evit tizout eur santelez ken vras ma n'hello mui netra mirout ouzin da vont betek Doue. (Sant Aogustin).

« Hent da gemer :

« 1 a. Sellout mat, hep sponta, eus doareou ar stourmad, en em izelât, goulén ar c'hras da amzav hon dienez hep fallgaloni.

« 2 il. Deski an tu da reizha ar pezh a blij pe ne blij ket d'in. Pedi.

« 3 e. Poania da veza dizeblant en eun doare santel.

« Barn ar pezh a blij pe ne blij ket d'in ervez bolontez santel Doue :

1. Goulén petra d'ober digant Bolontez Doue : « Aotrou, petra fell d'eoc'h e rafén ? »

2. Klask atao ober Bolontez Doue.

3. Karout a greis-kalon Bolontez Doue. Kaout mennadousantez Tereza ar Mabig Jezuz : « Kaout a ran holl oberou Doue. »

* * *

« Santelât ar sul evit ar re n'her greont ket. Evel eun tour-tan e tle beza ar sul da sklerijenna ar sizun. »

* * *

Eur pennad e chom Monik, dounnoc'h er retred, da deurel pled e douster an devosion.

« Douster ar galon, emezi, a zistruj ar pec'hed. Evel Leanez a Druez ni hon eus ar c'hras da zistruja ar pec'hed. An douster en hor c'henver hon-unan hag an druez e kenver an nesa a bourchas d'eomp eur setanz a druez da eur hor maro.

« Douster : taol roet gant ar Spered Santel d'an eneou. Ret eo, evit kaout digant ar Spered Santel an taol-se hag a dommo hor c'halon dizeblant ha yen.

« 1. Mennad eur glanded vras.

« 2. Eur mell fizianz.

« 3. Sioulded.


« 4. Pardon an ofansou.

« Ar pezh a zo ret evit douster ar galon :

« I. Guelout skler ennomp hon-unan. (Aotrou, ennoc'h am eus laket va holl fizianz, n'am lezit ket da vont da goll.)

« II. Beza mezek en diabarzh evit santelât, kempenn ha reizha hon ene. Beza mezek evit beza karantezus.

« Erfin ezomm da zigoll an Aotrou Doue eus ar boan hon eus graet d'ezan.



MAISON-MÈRE. — Intérieur de la Chapelle

« Pouezet hon eus dre ar c'heuz war an amzer dremenet.
« War an amzer da zont e pouezimp dre ar volontez start
da virout diouz ar pec'hed. »

Ha goude beza taolet war ar paper eun nebeut sonjou
diwar-benn truez Doue ha gueleit e tle eul Leanez a Druéz
beza, 'en dra holl, henvel eus Kalon Jezuz... Goude beza
santet an druez divin en-dro d'he buhez a-bez, Monik a
grenn :

« I. Ne fell d'in mui displijout da Zoue, kousto pe gousto,
a ratoz kaer.

« II. Hiviziken e fell d'in plijout da Zoue e pep tra ! » A
sklerijen peurbadus e sked ar sonjou-se : « Eun dervez e
vezin diskaret gant ar maro. Eun dervez, Doue her goar, a
vezo va dervez diweza ! Ne daper ket eur maro santel dre
laer, ret eo pourchas anezan hed eur vuhez. En em brepa-
rump kement ha ma hellomp. Ar vuhez a zo eun hent hag
a zistro da Zoue ; ar maro a ra d'eomp distrei d'ar gêr. Na
dishenvel e kavomp an traou pa velomp digor hor bez ! Mar
ne ouezomp ket, epad hor buhez, plega mat da volontez
Doue, penaos e ouefemp he digemer da bred ar maro ? Ra
vezo eur maro pep dervez eus va buhez dre va sakrifiz ha
dre va faoùrentez a galon... »

Met eus a bell e vel ar maro, en eun daolen a beoc'h ;
rak krenna ra gant sant Aogustin : « Splann eo kement a
zeu diouz ar C'hrist. »

*
* *

Teurel a ra pled en devosion virvidik, e glanded ar
galon. Skoet eo bet gant eur gomz eus sant Bernard : « Dont
a reomp da veza ar pezh a garomp. » Ne gar ha ne fell d'ezi
karout nemet Jezuz Krist ; bez' e vezo eta Jezuz Krist ! Gland-
ded ar galon, emezi, azo viktor Karantez Doue hagam nesa,
dre ma ro lamm da dechou fall hon natur

« Dre eno e lakomp Doue a-du ganeomp :
« Ouzoc'h me sello hag ho lako da greski. »
« Glanded ar galon :
« I. A zoug ar galon da garout Doue ;
« II. A gresk karantez Doue. N'hell ket eur galon c'hlan
chom hep karout Doue ;
« III. A ra d'eomp pedi aesoc'h ;
« IV. A zo lojeiz eur peoc'h leun. « Kaera donezon a hellfe.
Doue rei d'eun ene eo peoc'h ar galon. » (Ozanan.)
« V. A sikour henvelekât hon ene gant Jezuz Krist. »
Goude e tesk Monik ar vertuziou : Paonrentez, Glanded,
Sentidigez, a dleo diwezatoc'h ober le da gaout.
Taolomp eur sell hepken war ar sonjou diweza.
« Muïoc'h a labour a zo gant buhez an ene eget gant
buhez ar c'horf...
« Va Doue, n'oun netra, n'hellan netra.
« Paour eo va labour mar ne boanian ket gantan.
« Ne glemmin morse, nag uhel nag izel, morse, morse.
« En em zistaga ar muia 'r gwella diouz ar muia 'r
gwella a draou.
« Seul- vui e teui er maez- ac'hanout da-unan, seul-vui
e teui ennon. (*Skouer Jezuz Krist*)
« Evit mont d'an Douar Prometet, ret eo toulla hent dre
ar sakrifiz. Met nag a grogadou gant hor c'harantez direis
evidomp hon-unan. Lakat en hor penn trec'hi ar garantez-
se. (Mouse'hoarzin d'an trubuilhou, da gement a izela).
Dre ar stourmad-se e kavin ar frankiz, ar sakrifiz leun-bar.
Ret eo en em zistaga diouz pep tra evit beza holl da Zoue!
An distag-se ac'hanomp hon-unan a ro d'eomp levenez ar
peoc'h, an donezon a beden. Ne c'hounezzer ar viktorieu-se
nemet goude stourmajou yut. Ret eo : *ober ar c'hammed*,
hep derc'hel netra evidon. Va c'haret en eus Doue, en em
roet eo evidon. »

« Eur c'hanivelez nevez eo eur retred... Breman eta e
vezo her ger : *hep dale, hep netra d'in, hep distro*.

« Gonlen an tri urz-se digant Hor Salver. Kuitât pep tra
ha me va-unan, hep dale, hep derc'hel netra, evit atao.

« En em lakat er renk izela oc'h en em gaout netra...

« Petra! eur merzer souezus eo bet ar C'hrist, hag e
fellfe d'it beva evidout da-unan?... »

Met guelit, leun a skiant vat hag a furnez eo he ene, er
wir sklerijen ema izelded he c'halon : « Lakat da
dalvezout donezonou hon natur en hol labour, rak bez' ez
int da Zoue ha ret eo d'eomplabourat ganto evit e c'hloar. »
(*S. Ignas*)

Hag e berr gomzou e laka ar pezh a dle eun abostol da
gaout :

I. « *Izelded a galon*. Buhez en diabarz. Buhez an ene, ar
beden eo a denn Jezuz war dachen an abostolaj.

« II. *Paourantez a galon*. Gant ma vezo graet labour
Doue ganin pe gant eun all!...

« III. *Nerz-kalon*, graet gant karantez ha fizianz.

« IV. *Poan*. Ar boan a laka eun abostol da zougen
frouez. »

« Eur sakrifiz pemdeziek eo buhez eul leanez, a skriv-
hi dervez he Gwiskamant. *Benedictus Dominus* : Doue
benniget. Ra vezo ar gomz-se ar penn kenta eus va holl
oberou. »

« *Sakrifiz karantez*. » En daou c'her-se ema holl
c'hoantegeziou Monik. Ar sakrifiz dre garantez, evit ar
Garantez... ha leun eo he ene a garantez pa dars dervez he
Gwiskamant. Pourchaset en eus an dervez-se dre ar
sakrifiz ha dre ar beden; echu eo ar retred hirvidik ha
sioul : « Setu an dervez graet gant an Aotrou Doue. »

Bodet eo er japel ar familh ervez ar c'hras hag ar familh
ervez ar gwad. Er renk kenta ema ar Goulennerezed ; war

o zal skedus a sklerijen dreist-natur e par eul levenez dous. Er c'heer lugernus a c'houlaou, ema an aotrou 'n Eskob en e gaera ha beleien niverus...

Setu digoret al lidou. Hep dale, ar broziou du, eun tammig c'hoaz doare ar bed ganto, a zo dilezet evit ar wiskamant leanez ha gwel wenn an Novisiadezed a c'holo an taliou glan... N'heller ket lavarout pegement e trid kalon an Novisiadezed yaouank nag hini o c'herent, paet eus o sakrifisou dre an eürusted a sked war an dremmou karet ha dre ar peoc'h laket gant Doue e goueled o ene. Dreist ar re all, dre he ment hag he doare soudard, etouez he c'hoarezed niverus e sav Monik, breman *Seur Franseza-Romen*.

Epad lidou ar wiskamant ha sakrifiz santel an oferen ec'h en em ginnig beuzet en he levenez... Ha n'ema ket war he c'halon an akt a brof savet ganti he-unan? Len-nomp anezan.

URZ LEANEZED AN DRUEZ.

Prof ac'hanon va-unan hag oberou a drugarez evit eürusted va Gwiskamant e Gouel Itron Varia ar Seiz-Glac'har, 15 a viz gwengolo 1928.

Va Doue, dont a ran, me ho krouadur dister, d'en em westla d'eoc'h a-bez, va Doue. N'oun netra; drezon va-unan n'hellan ket zoken en em rei d'eoc'h, rak-se ho pedan d'am c'hemer evel n'eus nemedoc'h goest d'am c'hemer gant hoc'h holl galloud. Rei ran d'eoc'h va c'horf, va ene gant e holl skianchou, va c'halon gant he holl c'hoantegeziou. Va Doue, en em ginnig a ran d'eoc'h evel eun oanig evit ho karantez evit ho konforti hag ho karout e-lec'h ar re a ra poan d'eoc'h ha n'ho karont ket.

Me fell d'in, o va Mestr mat, en em zerc'hel bepred evel eur bugel bihan hag a oar, dre e vousec'hoarz seven ha glan,

didui e vamm hag ober d'ezi ankouât he foaniou. Jezuz madelezus, diskuizit ennon evel ma tiskuiyec'h gant Mari-Madalen e Betani. Va Doue, en em ginnig a ran evit ho trugarekâteus ar c'hrasou diniver hoc'h eus roet d'in; eus ar c'hrasou a boaniou hag a sakrifisou. En em ginnig a ran evit goulenn pardon diganeoc'h eus va fec'hejou ha rapari faotou va buhez tremenet. Va Doue, kemerit ac'hanon, kinnig a ran d'eoc'h va buhez; ra vezo peb eur tremenet war an douar eun akt a garantez. Ho pedi ran, o va Doue, grit d'in mervel zoken eus an diaesa maro, met n'am lezit ket d'hoc'h ofansi na da baouez beza brokus da respont d'ho krasou; va buhez n'eo ket d'in, kemerit anezi evel ma plijo ganeoc'h. Va Doue, roit d'in ar c'hras da veza eun Novisiadez devot evit beza eul leanez santel. Roit d'in ar spered a baourentez, a c'hlanded, a sentidigez, karantez va Reolen, an izelded a galon, ar vadelez, an douster, ar basianted; grit d'in hoc'h anaout evit ho karout, en em anaout va-unan evit en em zispriout; ne lezit ket an ourgouilh da gemer morse va buhez. Bezit evidon ar c'hras da vervel bemdez d'in va-unan evit beza distag mat da eur va maro. Va Doue, bennigit va maro.

Roit d'in peoc'h, fizianz, karantez santez Tereza, grit d'in krompren ha heulia he hent bihan. Va Doue, en em rei ran d'eoc'h hep derc'hel netra ganin, grit ma vezin eur benveg sentus etre ho taouarn, lakit ennon ar vertuziou a fell d'eoc'h guelout em ene...

Va Doue, roit d'in ar c'hras d'ober kement a blij d'eoc'h.

Digemer a ran an holl groaziou a fello d'eoc'h digas d'in; ra vezo ar gouliou resevet ha chomet ennon merk va c'harantez ha ra vezint eürusted ha silvidigez ar re o deus o graet. Va Doue, ho krouadur oun, fellout a ra d'eoc'h ho karfen. Seul-vui a boan e tiwaskin, seul-vui e fell d'in mousec'hoarzin, o va Doue, evit diskouez d'eoc'h va c'ha-

rantez. Va Doue, n'oun netra, met an netra-se her rei ran d'eoc'h. Va digemerit en ano ha dre veritou ho Mab divin ; unani ran va sakrifiz gant hini ar C'halvar ; her c'hinnig a ran d'eoc'h dre Vari, va Mamm, dre sant Jozef, santez Mari-Madalen, sant Yann, santez Monika, sant Fransez Asiz, santez Tereza ar Mabig Jezuz ha va Ael mat.

O Mari, o Mamm dener, bezit sonj ez oun ho pugel, etre ho taouarn en em ginnigan da zervez va gwiskamant ; ganeoc'h, o Mari, e vezin bepred feal d'ho Mab divin. Va Doue, va Roue, d'an dervez ma roit d'in ar c'hras da veza dirak an dud an hini a vezo ho pried, aotreit ac'hanon d'unani em sakrifiz kement hini a garan, kement hini a c'houlennan grasou evitan diganeoc'h ; roit d'ezo ho pen-nôz ; ra vezo va frof, dre ho meritou, o va Doue, evit o brasa eürusted. Holl-c'halloudek oc'h ha mar deo bras kenan va mennadou, n'int netra e skoaz ho kalloud divent...

Ha Monik a c'houlenn an eürusted evit he mamm garet, evit he zad, evit Mari Jenovefa ; pedi ra evit he c'herent beo pe varo, evit an Tad Konrardy, evit he mignonezed. N'ankoua den nag en he familh eus an douar, nag eus he mignoned, nag eus he familh relijius. Pedi ra evit kelc'h A. C. J. B... Anken ebet, trubuilh ebet n'eo dizonjet en dervez benniget-se... Echui ra he feden dre eur c'halva-den abostol : « Bezit truez eus ar bobl, bezit sonj eus ho komzou, Mestr madelezus : *Misereor super turbam !* Ho rouantelez deut d'eomp !... »

« D'ar sadorn 15-9-1928

Monik DELERU. A. C. J. B.

evit atao SEUR FRANSEZA-ROMEN. »

* * *

Goude al lidou, an Novisiadez eürus en em daolas etre diyreac'h he c'herent karet. Pebez pok etre ar wamm hag

ar verc'h ! Laouen eo Seur Franseza-Romen o velout he zad en e gaera, gant fouge e chom he sell da bara warnan : evelse ema dirazi he mamm-vro, he Beljik ker. Goulennet en doa kement-se da zervez he gwiskamant.

Plac'h yaouank, meur a wech en doa lavaret Monik d'he mamm : « Da Ael mat e vezin. » Setu kenta komzou an Novisiadez yaouank en eur vriata he mamm : « Breman ez oun evit atao da Ael mat e kichen an Aotrou Doue. » Ac'houdevez alies e aslavaras he lizeri : « Me fell d'in e vefes eürus, va mamm ; va sakrifiz a zo re vras, ne nac'ho ket an Aotrou Doue ouzin ar pezh a c'houlennan evidout. »

« Gouzout a rez, a lavare-hi c'hoaz d'he mamm, ne fell d'in netra war an hanter, eul leanez santel e fell d'in beza... Hag evit gwellat e c'houlenne diganti : « Ne velez ennon netra da reiza ? Ha rust e kavez atao va mouez ?... » Ha bez' e oa-hi breman evel ma felle gwechall d'he mamm e vije ? Ha c'hoaz : « Arabat kaout aon d'ober poan d'in. Lavar d'in ar wirionez. Diganit e tigemeran pep tra, her gouzout a rez... » Hag e gwirionez n'en doa ket an disparti bihanaet teneridigez ha boazamanchou ar bugel... P'en em gavent goude meur a viz, peb abardaez e taouline Monik, evel gwechall, dirak he mamm hag e c'houlenne diganti he bennoz.

Goude ar wiskamant hag eun nebeut derveziou, pa voe ret d'he zad kimiada ha distrei d'ar Beljik, ez eas Seur Franseza-Romen ganto betek dor ar gouent. Kenavo e lavaras d'ezo ha ken dinec'h ha tra, dirak an dud, e taoulinas chars an itron Deleru evit reseo eur wech c'hoaz bennoz he mamm.

D'eomp e lavaro eur c'henvroadez eus Mons petra sonje Monik abaoe m'oa en Druez ha penaos e chom feal he c'halon :

« Er penn kenta eus he Novisiad e skrive d'in : Deut oun d'en em anaout em c'hazarn karet, rak bez' ez ompeyel soudarded, henvel a ran va Novisiad va amzersoudard. (Daoust ha n'eo ket ar wirionez ?) (1^a a viz genver 1928).

Gant nerz e komze d'in eus he buhez pemdeziek : eus an ofisou « ken kaer hag ervez an Iliz », euriou a beden, labouriou : « Hirio ema va zro da walc'hi, da skuba ; kenteliou ogrou, prejou, kenteliou kan, « kan plean e doare Urz Sant Beneat hag am eus poan o velout skler ennan », kenteliou all, etc... pennadou diskuiz. « D'an dervezioù gouel e kemer hor Mamm enorus perz er pennadou diskuiz, ken brao ma kav d'in beza er c'helc'h-studi ; kanaouennou a ra d'eomp c'hoarzin da ouela ! »

Evel m'her gueler, en he c'halon e chome he c'helc'h-studi.

He mennad bras a oa digemer ar wiskamant leanez.

« Abaoue hanter miz even eo brao ha tomm an amzer, kaer al liorz hag ar maeziou tro-war-dro, met kaeroc'h e vezo c'hoaz p'am bo an eurvad da dremen ennan gant broz ha koef askellek al Leanezed. » (14 a viz gouere 1928).

Setu deut da wir an huvre eürus-se !

« Nag e karan va gwiskamant, va ano Leanez a Druez, va galvedigez ! Labourat evit ar re all, n'eus netra talvoudek nemet an dra-se war an douar. » (27 a viz kerdu 1928).

VIII

Antronoz an dervezioù benniget-se, Monik, ha ne hanvimp mui diwar vremen nemet Seur Franseza-Romen, a grog adarre, muioc'h entanet hag izeloc'h a galon, en he buhez pemdeziek a Novisiad... Eus he c'halon e sav eur c'han a drugarez :


« Va Doue, bennoz d'eoc'h evit ar c'hroazioù, an trubuilhoù hoc'h eus digaset d'in. Eur boan a ugent vloaz a zo bet priz va Galvedigez ; va distaget hoc'h eus drezi diouz ar bed. Bepred e tiwado ar gouli... Ra vezo testeni va anaoudegez vat. Ouspenn, desket hoc'h eus d'in drezi anaout poan ar re all. O ! ra gonfortin an dud reuzeudik gant an donezonou hoc'h eus laket ennon. »

* * *

« 13 a viz du 1928. Va Doue, digemer a ran ar groaz gant karantez ? Ra vezo kuruva sakrifiz. Ne fell d'in nemet ho prasa gloar hag ho polontez. En distro, Mest madelezus, gounezit ar bec'herien, diouallit an eneoù a garan hag e pedan ac'hanoc'h evito. Va Doue, ne c'houlennan evidon nemet ho karantez hag ho kras ; digemer a ran ar c'hroazioù hag ar poanioù. Ne fell ket d'in kaout va eürusted war an douar. Va eürusted a vezo ho karout em breudeur doaniet. »

* * *

Dirak a eun daolen eus Hent ar Groaz : Jezuz a frealz merc'hed Jerusalem... « Setu ar garantez en he c'haera sked, eme Seur Franseza-Romen. Prizout evel netra hor skuisder, hor poanioù, hor merzerinti, dal m'en em gavomp dirak poan an nesa ; truezi ouz e holl boanioù, zoken pa n'eus den dinoc'h egedomp a druez...



MAISON-MÈRE. — Statue de Saint-Joseph

— 69 —

* * *

« Gant Jezuz poan gollet ebet, klemm dianket ebet, daelou didalvez ebet. »

* * *

« Eur garten-vizit digaset gant Doue eo pep poan. Pep tro ma teu eur groaz, lavarout : Setu Jezuz o tont davedon. »

* * *

« Bez sonj, va ene, eo laket ar boan evel eur siell warnout ; bez' ez eo eienen da labour Leanez a Druez... »

« Va Doue, ra lakin atao da dalvezout evidon skiant-prena ar boan hag an donezonou hoc'h eus laket ennon dre ar c'hroaziou hoc'h eus digaset d'in... »

Kutuilh a reomp e meur a lizer skrivet d'eur vignonez vihan ar memes sonjou war ar poanion, ar memes taolennou a eternite...

« Kompren a ran ec'h eus poanion etouez ar re n'o deus da santimanchou. Poan ec'h eus, met ha n'emaout ket war an douar evit gounit ar baradoz ? Laouen oun eus da nerz-kalon, eus da volontez start. »

* * *

« Sonj ec'h eus eus ho pec'herinajou bihan ? Setu miz Mari, tremen a ra pep tra, met ar baradoz hon unano da viken. Nag eo nebeut a dra joaiou ar vuhez e skoaz an eternite... »

* * *

« Muioc'h a veritou e talv d'comp ar boan evit an nenv elec'h ne drenko netra hon eürusted en unaniez leun-bar »

* * *

« N'out ket evit huvreal al levenez a zo er sakrifiz parfet evit Doue hag an nesa. »

* * *

« O ! nag eun dra vat eo ar Groaz ! »

* * *

Seiz miz goude beza deut d'an Druetz, Monik en doa skrivet : « Abaoue seiz miz m'emaoun en Ti santel-man eo divent va eürusted. » Diwezatoc'h e skrivo c'hoaz da X... : « Eus an Ti-man e tars ar santelez, eur spered leal hag a blij d'in, gwir spered an Aviel. »

Nec'het eo he c'halon ken tenre gant he mignonez : « Hag eürus out-te, mignonez vihan ? Ne ouelez ket re alies ? Gouzout a rez eo ar groaz merk an eneou karet gant Doue. Gouzout a rez emaoun atao en da gichen, n'eo ket a gorf a dra sur, met dre ar beden, ar pezh a zo kalz gwelloc'h. »

D'e giniterv vihan e skriv ar misioner al lizer dudiusman ; evel ma ro d'eomp da anaout gwelloc'h hon Novisiadez, e lakomp anezan dirak ho taoulagad ;

« 6 a viz genver 1929. »

« Pa skriven da Monik Deleru, eur plac'h yaouank hag ec'h eus anavezet mat, e lezen va fluen da redek ken dinec'h ha tra. Breman eo da Seur Franseza-Romen e kasan va faper ha ret eo kemer manegou da skriva d'ezi ! met, d'am sonj, en eur droka eur giniterv gant eur c'hvar, ne gol-ian netra hag e c'hounezan pep tra. Emaout eta Novisiadez na Novisiadez eürus ; met nag a hent eo bet ret d'it ober evit tizout ar pal-se !... Pa da velen o stourm ouz an diaezaman-chou e sonjen : « Mar teu he sonjou a Zoue e talcho mat. » Ha dalc'het ec'h eus mat. Ret eo dalc'hen mat betek penn : mar kouez warnout an anken, bez sonj eus kement ec'h eus gouzanvet evit heulia da c'halvedigez, ha guel neuze holl dalvoudegez galvedigez Doue d'ar vuhez relijius ha d'ar santelez. Bez' eus mareou hag eo du ar vuhez hag e

vefe keuz da veza kemeret an hent m'emaer warnan. Mar ne gavez morse mareou evelse en amzer da zont, gwella-se !... Mar kavez, ar sonj eus da boaniou tremenet gant gras Doue a zalc'ho ac'hanout en da sav. Rak-se dont a ri da veza eur « santez vras » hag eur « mell santez ». Taol evez, dor an nenv a zo izel ! Ret e vezo d'it stoui da benn evit tremen.

« Lavarout a rez d'in en da lizer ema da dad, da vamm o vont da chom da Vruksel, gant Mari-Jenovefa emichans, n'her gouien ket. Er Gêr-benn eta ema servich da dad ? (Ar major a oa o paouez beza hanvet e Bruksel.) Kompren a ran, a gendalc'h ar misioner, e rafe ar chenchamant-se poan d'it ; pa dremenan va unan dre Liej, dirak ti va c'havel, tud estren ennan abaoe pell zo, e strisa pep tro va c'halon ha koulsgoude ret eo bet d'in hed va buhez kuitât tud ha lec'hioù karet. Va merc'h an Aotrou Doue, hep goulenn kuzul diganeomp hag hep lavarout netra, a droc'h an eil goude egile an neud a stag ac'hanomp ouz ar bed : mar ne bleger ket ne dalveze ket ar boan beza leanez. Setu perak eo ret da genta lezel Jezuz da denna diganeomp ar pezh a fell d'ezan. Da c'houde, en da gouent, pell eus da dud, eus da familh, mar poaniez da veza ken parfet Novisiadez ha ken parfet leanez ha ma hellez, e serviji gwelloc'h eneou da gerent dre da bedennou ha da sakrifisou eget o chom en o c'hichen. En eur vont da leanez ec'h eus graet eun dra hag a blij da Zoue. Respontet ec'h eus « ya » pa oa en da c'hal-loud respont « nann », plijout a rez eta da Zoue. Da garout a ra muioc'h eget ma vijes chomet er bed. Galloudusoc'h eo breman da bedennou ha Doue a hentcho, a skoazello, a vennigo da gerent fiziet ennan ganit o kimiada diouto evitan. Fizianz eta e Doue !... Ken mat eo ! ken fur ha ken galloudus ! Diouallet mat eo ar pezh a zo diouallet gant Doue.

« Nag hir eo va lizer ! Petra lavaro ar Vamm enorus Mestrez an Novisiadezed ? Sellou du ray ouzin... »

« Bloavez mat hag eürus : nerz-kalon ha labour brokus e servij Jezuz. Va c'hoar enorus Franseza-Romen, an enor am eus d'ho saludi ; va c'hiniterv vihan, da vriata ran a greis-kalon. »

Nerz-kalon ha labour brokus, setu Seur Franseza-Romen...

Guelout a reomp en he notennou ar memes fealded, ar memes labour sioul... Daoust ha sonjal a ra ez eo tost he maro ?... Mar sonj, eo hep gouzout d'ezi ; beva ra kouls-goude, he sonj bepred en eternite hag er maro.

D'ar c'henta a viz genver 1929 e skriv, hep mar ebet evit beza brokusoc'h c'hoaz :

« Setu eur bloavez nevez, marteze an hini diweza. »

Ne ouie ket lavarout ken mat...

« Eur sklerijen lemm eo ar maro », emezi c'hoaz. Hag e klaske gueleut pep tra ouz ar sklerijen-se.

* * *

« Ar boan a zo eur sklerijen lugernus hag a ra d'eomp guelout n'eus netra e traou ar bed-man... » (Noten an 28 a viz c'houevrer.)

* * *

« Va Jezuz, ret eo d'in beza c'houi. »

* * *

« En em deurel etre divreac'h Doue evel e divreac'h eun Tad e tesk d'in an umilite en drubuilhou... »

* * *

« Mousc'hoarzin da Zoue en eur zihun ; p'en em roan d'ezan e ran e volontez. D'an noz, er sioulded vras, dige-

mer Jezuz, o tiskuiza ennon da veza dilezet gant e dud, gant eur mousc'hoarz ken seven ha m'eo rust an der-vez... »

* * *

Nerz-kalon e ro d'ezi ar sonj-man eus an Tad Koudray : « Pa sonjer e vezo hor poaniou talvoudek evit ar re a garomp, e kaver muioc'h a basianted d'o gouzanv. »

Klask a ra tenna diouz he buhez an holl dalvoudegez dreist-natur a zo enni ; diskouez a ra evel-hen he c'harantez hag he aked d'al labour :

« Pep taol ma rin sin ar Groaz, e venhan goulenn ar gontrision barfet evidon, evit an dud en o zremenvan, hag er memes amzer pellât an diaoulou.

« Pep taol ma plegin va glin : resped an traou santel.

« En eur sevel diouz ar mintin : ar c'hras da c'houzanv mat ha d'en em lakat etre daouarn an Aotrou Doue evit ober e volontez.

« En eur vont da gouskat : ar c'hras da gaout eur maro mat. (Eul linen a zo dindan ar c'homzou-se.)

« Dre va finijennou, sakrifisou, poaniou a gorf pe a ene : ar c'hras da ginnig pep tra evel kement a akt a garantez evit an Iliz, va Urz va familh, va mignoned, ar bec'herien, an eneou.

« Dre va holl sonjou, sellou, komzou : e c'houlennan ar garantez, ar glanded, an umilite.

« Ra vezo pep lamm eus va c'halon, pep huanad, eun akt a garantez.

« Dre bep kammed, goulenn ar c'hras da veza eul leanez santel ha birvidik.

« Dre beb *Ave Maria*, e c'houlennan skoazel Mari evidon hag evit ar re a vennan pedi evito.

« Da beb *Anjelus*, e c'houlennan karout ar Baourentez, ar Glanden, ar Sentidigez.

« En eur stoui va fenn d'ar *Gloria Patri*, e fell d'in renta da Zoue va C'hrouer eun testeni a sentidigez a-berz ar grouadurien.

« Diwar vreman hag evit atao e fell d'in ho karout, o va Doue, lakat ac'hanoc'h da vouse'hoarzin, grit ouzin ar pezh a garoc'h.

« Da bep kroaz pe boan, e fell d'in kinnig d'eoc'h eur vleunen gaer a c'houez vat hag a blijjo d'ho lagad. »

« En em westla bepred eo buhez eul leanez. »

« Mat e vezer p'en em ginniger... »

Ha guelit penaos e kompren ar santelez er vuhez e kevret : « Dleet eo d'in gouzanv pep tra a-berz ar re all, en eur vouse'hoarzin ; ha chom heb ober poan ebet d'ar re all. »

« Va Doue, e ped-hi, digemer a ran hag ho trugarekât a ran da rei d'in labour eun diren eneb d'ar gurun, mar hellan komz evelse. Digemer a ran kement a blijjo ganeoc'h digas d'in, hag an dra-se bepred gant eur mousc'hoarz. Karout a rafen kuzat ouzoc'h va foaniou evit diskouez d'eoc'h atao eun ene seder evit ho laouenât ha plijout d'eoc'h. »

« O nag ema, e gwirionez, Novisiadez vihan an Druéz e skol santez Tereza ar Mabig Jezuz !

Gant he fatronez eus an nenv e kane :

« *Beva a garantez, n'eo ket, war an douar,*

« *Sevel eun telt padus war beg Menez Tabor ;*

« *Bez' ez eo gant Jezuz pignat war ar C'halvar,*

« *Ha sellout ouz ar Groaz evel ouz eun tenzor...* »

Setu aman c'hoaz eun nebeut sonjou all taolet ganti war baper epad eur retred : « Sentidigez trum ha seder ouz va Superiorezed.

« Eul leanez santel e fell d'in beza ; eun novisiadez santel e rin evit-se.

« Beza feal en eun doarebrokus -alies e lavar an dra-se d'an holl vertuziou... »

« Na raouez int, a lavare santez Tereza ar Mabig Jezuz, an eneou a ra pep tra ar gwella ma hellont. » Eus ar re-se e oa Seur Franseza-Romen.

« Moustra war pep c'hoant d'en em blijout d'in va-unan.

« En em rei da Jezuz betek penn.

« Beza feal da holl gastizou bihan ar vuhez e kevret. En em izelât, n'eo ket hepken p'her meritomp, met dreist-holl pa n'her meritomp ket. »

Pep tra a servij d'ezi d'en em sikour da wellât. N'eus ar Vamm Mestrez an Novisiadezed nemet eun ali da rei ha kerkent eo heuliet ganti a greis-kalon...

Kredi ra d'in eo mat lakat dirazoc'h daou pe dri eus an eksaminou graet ganti eus he c'hostez. D'an dud dizesk e tesko kement-se al labour graet en Novisiad, labour talvoudek evit santelât an eneou.

Danvez eksamin :

I. En eur zihun, hag en em ginniget am eus-me gant feiz d'an Aotrou Doue ?

II. Epad an orezon, ha poaniet am eus-me da gomz ouz Doue evel eur bugel ouz e Dad.

III. Ha benniget am eus-me an eur gant feiz ha karantez ?

IV. Ha feal oun-me bet da chom sioul evit chom unanet gant Doue ?

V. Em zrubuilhou dister, em foaniou, ha galvet am eus-me Doue d'am sikour ?

VI. Diouz an noz, er sioulded vras, ha mat oun-me bet da gas diouz va spered ar sonjou goullou? »

Setu danvez eun eksamin all diwar-benn karantez Doue :

I. Em fedennou, hag aketus oun-me bet da c'houlenn kreski karantez Doue ennon?

II. Ha sonjet am eus-me, e penn va dervez, e oa va c'henta dever karout Doue a greis-kalon?

III. Ha n'oun-me ket en em lezet da zistrei diouz al labour-se war-dro va ene dre re a vall da labourat a gorf?

IV. Ha feal oun-me bet en traou bihan evit plijout da Zoue?

V. Em foaniou, em zrubuilhou, ha va c'henta-sonj a zo bet da c'hervel Hor Salver? »

E miz even 1928, en doa Seur Franseza-Romen kemeret evel tachen da stourm warni : Douster, pasianted.

I. Em holl devosionou, ha goulennet an eus-me digant Doue douster ha pasianted?

II. Pa zo bet goulennet servij diganin, hag hen rentet am eus-me a galon vat?

III. Pa 'z oun bet nec'het pe direnket gant eun dra ben-nak, hag hen diskouezet am eus-me?

IV. Ha kaset am eus-me kuit deustu an nec'h, an dris-tidigez, evit lakat ennon ar peoc'h hag al levenez?

V. El labour gant va c'hoarezed, ha pasiant oun-me bet, ha moustret am eus-me war va santimanchou?

VI. Goude va faoutou, ha poaniet am eus-me d'o rapari dre zisken izeloc'h? »

Hag eürus ha karet gant an holl, e kase Seur Franseza-Romen da benn he labour kaer wardu ar santelez.

IX

Dre he notennou en eus Monik, pe gentoc'h Seur Franseza-Romen diskouezet goueled he c'halon... Guelet hon eus enni he c'harantez evit Doue, he naon a sakrifisou, he ezomm a umilite, he sec'hed a santelez...

Respont da volonteaz ar Mestr divin a oa evit ar santelez.

Hogen d'ezan e felle e vije santel, ha santel en Druéz, da lavarout eo oc'h unani eur vuhez dreist-natur gant an donezon anezi he-unan d'an dud dister, d'ar beorien ha d'ar glanvourien.

Kement e karas Urz an Druéz! Ne vele Urz kaeroc'h ebet... Eviti he holl C'hoarezed a oa sentezed...

Met en Novisiad, petra ra? Penaos en em zalc'h? Petra sonjer outi?

Monik, kerkent ha deut ha war wellat ez eas an dra-se bemdez, en em ro a greis-kalon d'ar sakrifiz, d'ar fealded en deveriou dister, en he doare kaer, penn kil ha troad, hep trouz.

Gant ar memes sioulder e veler anezi er rusta labouriou er gegin, er poull-kanna, dre an ti. He ment uhel, he yec'hed krenv, he stumm nerzus a ra d'ezhi goulenn an diaesa micherion.

« Lezit an dra-se ganin, va c'hoar, krenvoc'h oun egedoc'h... »

Eur mouse'hoarz hag e lezer anezi d'ober, hag e toug sammou pounner, sailhadou dour lor, botegoù legumaj hag a bouez mat, laouen o tivec'hia he c'hoarezed pa zistroont diouz al liorz. E pep lec'h ema-hi evit dizamma ar re all ha ken brao, ken modest, ma ne voe guelet he aked d'al labour padus ha kuzet nemet pa voe maro. Pet gwech ne gempennas ket dre guz, heb en em lakat da dalvezout, boutou he c'hoarezed, ar plac'h yaouank kenedus-se eus



MAISON-MÈRE. — Le Calvaire

ar bed, deut da veza eun Novisiadez eus an Druez !...
« Guelout a ran Doue e pep hini eus va c'hoarezed, a lavare-hi, ha neuze penaos n'o servijfen ket?... »

Pa veze goulennet sikour diganti da gas tan, er goanv, d'al leanezed klanv pe goz, e veze mallgant Franseza-Romen dougen ar muia gwella dirak ar c'hadoriou evit mirout ouz he c'hoarezed d'en em skuiza.

Mont a rae d'an distera labour, gant he doare soudard, hag ivez, ken kaer ha tra, d'he « buro » da liva bokedou evit eur gouel bennak pe evit unan eus he c'hoarezed ; hag eno hep derc'hel d'he doare da varn an traou-se, e sente ouz ar re all gant ar prez a ziskoueze en distera labouriou, a-bez e chome he bolontez stennet wardu ar pal-se : *ober mat an traou bihan*, dre garantez evit Doue... Gwelloc'h dornet evit al liverez eget evit ar muzik, e c'hoarie Seur Franseza-Romen koulskoude brao-bras ar muzik hep morse diskouez beza inouet... Da zervez he Gwiskamant e c'houlennas he zud diganti petra rafe plijadur d'ezi : « Pennadou kaer a vuzik », a respontas-hi.

En eur dremen dre Bariz e kasas d'ezi ar major hag an itron Deleru ar pezh en doa goulennet. Pebez levenez e voe evit an Novisiadez yaouank lakat ar pennadou kaer-se etre daouarn he mestrez muzik. Ha d'ar sulvez diweza ma c'hoarias epad an ofisou, e roas eur pennad eus ar muzikou o doa graet d'ezi kement a blijadur.

Bez' en devoe meur a wech, evel ma c'hoarvez peurvuia, da c'houzanv a-berz he c'hoarezed ; en eul labour e voe ganti eul leanez santel, met stris a spered, ar c'hontrol beo da Monik a gavas eno tro da greski he fasianted, hi ken digor ha ken ledan he spered. Poania rae neuze da chom sioul ha da lakat eur mousc'hoarz dudioz war he dremm kenedus. Mestr e oa d'ezi he-unan.

Goude maro Monik, e lavare eul Leanez oajet : « Pebez

koll ! ken mate laboure evidon, ken brao e servije ac'hanon hep gouzout dare d'in. »

Ken dous oa he doare da servija ar re all ma kreded e servijed anezi. « O ! bennoz da Zoue da rei tro d'in da velout ha da servija hor c'hoarezed klanv », a lavare-hi d'an Novisiadezed sikouret ganti e sal ar glanvourezed.

Seur Franseza-Romen a gare al labouriou dister-se. Daoust ha ne ouie ket, evel santez Tereza ar Mabig Jezuz, ez eo :

*« Ar vuhez umbl gant he labour dister hag aes
« Eun dra hag a c'houlenn eur mor a garantez. »*

(Diwar Verlaine)

A-bez e lake enni he c'halon hag he c'harantez.

« Pep mintin e c'houlennan digant an Aotrou Doue ar c'hras da gaout sonj eus an traou dister. » Daoust ha ne gredfer ket klevout santez Tereza ar Mabig Jezuz ! « N'eus labour ebet, ne vern pegen bihan eo, ha ne rofe ket e vouez epad an eternite da veuli Doue ha da greski gloar ha merit an dud eürus. » Monik her gouie.

Ar pezh a veled enni e oa eun tan a garantez maget gant eun nerz-kalon ar seurt ne vez ket kavet alies. Bez' en devoe derveziou diaes da dremen, pennadou sec'hor, noz-veziou tenval ha ne chom mui enno gant an ene netra eus an den. Ken beo e chomas tan he c'harantez atao war gresk dre ma poanie da vervel d'ezi he-unan evit en em staga ouz Doue. Eun dervez koulsgoude ma oa bet muioc'h gwas-ket gant ar boan, tenvaloc'h an noz, gwasoc'h ar sec'hor, e teuas al leanez yaouank d'en em strinka ehars daoulin he Mamm : « Va Mamm, n'oun ket evit mont ken... n'oun ket evit mont ken ! » hag en he mouez e tremene holl ankrez he ene.

« Petra zo, va Bugel ?... Ha c'hoant hoc'h eus da sellout adrenv ? »

Eul lamm a reas Seur Franseza-Romen en eur grial : « O nann, nann, va Mamm, n'eo ket an dra-se... O ! n'eo ket an dra-se... Met aon am eus ne garfen mui an Aotrou Doue. Ne ran netra evitan... N'oun ket evit mont larkoc'h ! »

Sioul, met hep chom da varc'hata e lakeas ar Vamm he merc'h en-dro war hent teuc'h met asur ar Feiz, hag ene an Novisiadez, eur pennad kouezet, ene leal ha tost d'e zever, gwir verc'h eur soudard, en em daole adarre er stourmad pemdeziek gant eun nerz-kalon nevez.

« En eur renevezi bemdez tan hon devosion, e talc'h hon ene bepred ennan eur c'hened splann », a skrive sant Gregor. N'anavezom marse klenvejou ar gosni keit ma talc'ho ar c'hoant d'en em renevezi heb ehan. Setu perak e lavare sant Paol : « En em renevezit e spered ho stad. « Setu perak e lavare ar roue David, deut da veza parfet, evel eun des-kard : « Hel lavaret am eus : breman eo e krogan. » E gwirionez, mar ne fell ket d'eomp kuitat an hent boulc'het, eo ret d'eomp bale gantan bemdez. »

Ha bemdez en em reneveze Seur Franseza-Romen.

Bez' e oa enni eun dra bennak eus nerz ar soudard, tapet emichans e kichen he zad karet.

« Ne chomomp ket da c'hourlec'hi, deomp war raok », o lavare-hi d'eul Leanez.

Antronoz he Gwiskamant e lavaras eun dra dudius : « Kerse e Kaven mont d'am guele dec'h d'an noz, gwelloc'h am ije kavet dalc'hen va broz. »

Sentus kenan ouz an aliou roet gant ar Vamm mestrez an Novisiadezed, ne voe marse guelet, a lavar he c'hoarezed, o lezel a gostez an distera dever hag ar sentidigez-se eo a ro, ervez santez Tereza ar Mabig Jezuz, he zalvoudegez d'ar

vuhez relijius. An dra-se a zo mervel d'eomp hon-unan nebeut ha nebeut. Pebez bolontez vat a zo ret da gaout evit-se!

Gouzout a rae e servije al labouriou-se graet gant karan-tez da savetei an eneou. « Ne d-in ket d'ar baradoz, emezi, evel eun taol avel, rak eur strollad eneou am bo da cha-cha d'am heul. »

Epad an deiz, en eur vont hag en eur zont dre al liorz pe dre ar gouent vras, e lec'h m'en em golle d'ar penn kenta, e veled anezi bepred gant he japeled en he dorn. Respont a reas d'eul leanez hag hel lavare d'ezi : « Krog e choman em japeled hed an deiz evit tenna kalz a eneou eus ar Purgator hag o c'has d'an nenv dre ar c'houec'h Pater hag Ave. »

Ene, e gwirionez, relijius, atao e tibabe n'eo ket al labour aesa met an hini diaesa, n'eo ket ar pep gwella met ar pep paoura. Dre ma soursie eus ar sekreteri, ec'h aspeded anezi da c'houlén eur montr : « Hag ar baourentez, emezi, petra rit outi ? »

Ret e oa gvelout dremm Seur Franseza-Romen o sklerat pa gleve pep sizun Mestrez an Novisiad o tiskouez d'an Novisiadezed war evez hag entanet, n'eo ket hepken kened, talvoudegez ha brasted labour eul Leanez a Druéz, met ivez ar sakrifisou, ar pinijennou a oa o c'hortoz anezo pa vije ret, deiz ha noz, beilha klanvourien baour e lojou lous. Skiant-prena en eus al Leanez, netra ne guz ouz he Novisiadezed eus an daolen o devezo alies dirak o daoulagad e tier lor : ret e vezo d'al leanez skuba, kempenn, gwalc'hi, aoza ar pred, louzaoui ar c'hlanvour ; ret e vezo, wardro bugaligou goloet a druilhous fank, derc'hel lec'h ar vamm glanv, dirouestla ha kriba pennou laou, siouaz ! « Eur pezh kaer, a lavar ar Vamm, ho sakrifisou hag ho karantez a salvo an eneou. Ret e vezo mont da c'houde,

eur wech deut an noz, warlerc'h eun dervez skrijus awechou, da veilha eur c'hlanvour, eur pec'her bras... Bete vremen n'eo ket fellet d'ezan klevout kaoz a Zoue ; ho tigemmer a ra atao gant ruster hag ho kervel a ra heb ehan da sevel e benn-vele, da rei d'ezan da eva. Ho spia ray hed an noz ha mar ho kuel atao dous o lavarout didrouz ho japeled pe bedennou all en e gichen, piou oar ha ne zigermero ket diouz ar mintin eur « vetalen vurzudus », kenta kammed eus e zistro da Zoue. Lavarit d'in petra vezo skuider an nozvez-se hep kousk, e skoaz ho levenez da veza erfin gounezet eun ene d'an Aotrou Doue ? »

En eur glevout ar c'homzou-se pe re all henvel outo, n'oa mui Seur Franseza-Romen mestr d'ezi he-unan ; en he daoulagad e skede eun elfen a dan... « An dra-se, ya, an dra-se eo am oa huvreet », emezi. Evit e Galvedigez kaer, evit he Urz ken karet, ec'h entane he c'hoarezed. « O na kaer, na kaer eo beza Leanez a Druéz ! » Hag o trei wardu ar Vamm : « Va Mamm, ne gasoc'h ac'hanon, ne ket'ta, nemet daved ar beorien ? »

Karout a reas ar beorien ha karout a reas ar baourentez. En eur dremen dreist treuzou an Novisiad, lavaret e vije en doa lezet er-maez betek ar skeud eus eur wiskamant eryl ar bed. Fellout a rae d'ezi beza paour hag e tibabe an dilhad koz, uzet, distum. Dacust ha ne oa ket gulet, epad he Novisiad, oc'h uza eur boutou ler dopez penteilhet kant gwech, ha pa felled rei d'ezi eur re all : « O nann, va Mamm, emezi, eur pennad e hell c'hoaz mont ar re-man. » Ha ne oa ket gulet ivez oc'h uza eur vroz mezer glas, teo ha gros ? Piou en dije lavaret neuze e oa Franseza-Romen, gwisket ken paour, eus eur familh gwisket brao er bed ? Maro oa enni pep santimant a fouge ha n'oa ket eur ger goullo he frof d'ar C'hrist.

Muioc'h eget n'hellfemp lavarout, e karas he micher er

sekreteri ; beva rae evelse koulz lavarout a-hed an deiz, e kichen he japel gaer, tost d'he Mestr divin. « En eur bourchas an aoter evit an oferen, emezi, e lakan warnan va holl mennadou, holl mennadou va c'hoarezed hag e lavaran d'an Aotrou Doue : « Sonjit en hini en eus laket ar bleuniou hag ar goulao-se. »

Leun oa he c'halon a garantez evit he c'hoarezed. Daoust ha n'en eus ket lavaret d'eomp e vele Jezuz en he c'hoarezed? Ken bras oa he ezomm d'en em rei, d'ober vad, d'ober eürusted ar re all ma amzave : « Mar vefen etouez Leanezed diaes beva ganto, na ne vefe ket gourc'hemennet d'in o c'harout, n'hellfen ket mirout d'o servija, eun ezomm eo evidon. »

Goulennet e veze diganti pardon evit eur gomz kasaüs : « O! me, an dra-se ne ra netra! Lavarit d'in kement ha ma karoc'h », hag e veled e sonje evel ma lavare...

Enni e oa nerzus, leal, bras pep tra, met goloet a umilite. Karout a rae, hel lavaret hon eus, ar pezh a oa diste ha paour. En eur zistrei diouz interamant eul leanez e lavare : « Ha! setu ar pezh a garan, paour eo interamant eul leanez. » Nann, ne garfen ket mervel war al labour, en unan bennak eus Tier hon Urz, rak neuze e vezer goloet a enoriou hag a veuleudiou, elec'h aman, er Vamm-Di, e varver kuzet, gwella-se! »

Ar maro! heb ehan e tistroe an daou c'her-se war he muzellou ha dindan he fluen.

Da c'houel an Holl-Sent e lavaras, teneraet gant kened lidou an Iliz, ken kaer en Druéz : « Mar d-eo ken kaer war an douar, petra 'ta vezo en nenv? »

« Ezomm ebet da glask trabas gant hor paourkeas korf, a lavare-hi c'hoaz, abenn hanter-kant vloaz ne chomo ket nemeur a dra outan! »

Sur awalc'h, ken leun a yec'hed, ken seder, e veve Seur Franseza-Romen gant sonj ar maro...

Guelet hon eus en unan eus he notennou kenta skrivet er gouent ar sonj-man hag a reneveze bemdez he nerz-kalon : « Mar tlefen mervel henoz, penaos e karfen-me beza tremenet an dervez? »

D'ar c'henta a viz genver 1929 e skriv : « Setu eur bloavezh nevez, marteze an diweza? »

D'ar c'henta a viz meurs : Sant Jozef, en em lakat a ran dindan ho skoazel, sikourit ac'hanon. « (Interet e tlee beza d'an 19 a viz meurs.)

Na ped ha ped gwech ec'h en em ginnig : « Setu me aman, va Doue ! « Aslavarout a ra betek hanter-kant gwech : « Mar varfen henoz ! « pe ar ger-man hepken : « Ar baradoz ! »

Hag he huanadou bero : « Jezuz madelezus, bezit diganin karantez evit karantez ! ... C'houi hepken, o va Jezuz ! »

D'unan eus he Superiorezed hag a c'houlenne diganti ha sonjal a rae mat en Aotrou Doue edoug an deiz : « Atao emaoun dirazan. Morse ne gollan ar guel outan », en doa-hi respontet.

Evit en em brepari d'ar Wiskamant, laket en doa kement-man en he fenn : « Labourat evel ma karfen beza labouret da eur va maro, evelse e tlean beza evit va c'henta gwestl. » Dilezel a ra pep tra gant levenez : « P'en eus va Mamm (Mestrez an Novisiadezed) troc'het d'in va bleo, e lavare-hi neuze, me am eus kinniget pep hini anezo d'Hor Salver. »

En em brepari ra bemdez d'ar maro-se hag a ra d'ezi beva ken uhel e sklerijen ar wirionez...

« P'emaoun daoulinet evit an Eur santel, emezi, e tigemaran ar maro a zigaso Doue d'in hag ec'h en em ginnigan d'Ezan. »

« Mestr mat hag a zo maro evidon, deskit d'in mervel bemdez d'in va-unan, evit ma vezin prest d'ar sakrifiz diweza hag evit ma hellin kaout ac'hanoc'h hed an eter-nite...

« O maro, pep tra e tenni diganin, ya, pep tra!... »

Hag e krenn : « Dous eo mervel evit eun ene feal... »

Eur wech all e tistro war ar sonjou : « Dous ha frealzus eo maro an den santel. Marvomp bemdez d'eomp hon-unan evit ma vezo hor maro « ar gouel bras » evidomp. »

N'oa ket Seur Franseza-Romen evit gouzout e oa ken tost ar « Gouel bras » !

E penn ar c'horaiz en doa Seur Franseza-Romen skrivet d'he zad, a dlee dont da velout e « verc'h vras », evit goulenn digantan gortoz Pask evit beza-hi muioc'h d'ezan hag hen muioc'h d'ezi. Ar major a asantas... Ne dlee mui he guelout e buhez.

X


Kaout a reomp e levr kaer an Tad Schryvers, « *An donezon ac'hanomp hon-unan* », meur a bajen war an donezon ac'hanomp hon-unan da bred ar maro hag a zere mat ouz Seur Franseza-Romen.

« Awalc'h, emezan, e kav an ene didroidel karout Jezuz hag ober e volontez a eur da eur. Evelse e tremen e vuhez, plean met eürus. N'en eus ket a boaniou rak evitan e tro ar poaniou e joaiou. N'eo ket nec'het gant netra, rak e pep tra e sonj Jezuz evitan. N'en eus aon raok netra, rak diouz dorn Jezuz e teu pep tra d'ezan.

« Evelse e vev an ene, kollet doun-doun e Doue. C'houeza hell an avel foll diwar c'horre, met n'hell ket mont betek ar goueled reis ha sioul. O Jezuz ! nag eun hevelep buhez a zo da veza c'hoantaet ! Hep konta m'eo sin eur maro kaeroc'h c'hoaz. »

« Petra ra d'ezan ar vuhez ? Petra ra d'ezan ar bed ? Abaoue m'eo en em roet Monik da Zoue, hag holl da Zoue, morse n'en eus sonjet sevel eun telt hed an hent a gas d'an eternite. Ar muia en eus graet eo chom a sav eur pennad e kostez an hent evit tapout he alan ha sellout ouz ar veaj graet. Ar pal eo e c'hoanta, wardu ar maro eo e red, rak ar maro, eviti, a zo penn kenta ar wir vuhez.

« O ! gant pebez soursi e pourchas ar gristenez vras-se an diweza eus he oberou, an hini talvoudeka, ha n'eus nemetan talvoudek en he buhez. Bepred e klask mervel ; bepred e tistag diouti he-unan dre eun akt a ofrans, e ro da Zoue ar pezh eo eo, ar pezh en eus pe e hell kaout eun dervez. Rei ra d'ezan he ene evit beza santelaet hag unanet gantan. Rei ra d'ezan he c'horf evit beza diouallet pe zistrujet ervez e volontez ; rei ra d'ezan he buhez evit beza digemeret gantan en-dro d'an eur m'en devezo choazet, en doareou



Une Allée de la MAISON-MÈRE

m'en devezo merket. Eur maro digemeret araok eo peb eur eus he buhez.

« Mervel heb ehan eo beva evelse. Pa zeuy Doue erfin da lavarout d'ezi « Ret eo mervel », petra responto d'ezan he ene, nemet : Mestr mat, ne ran nemet an dra-se meur a vloaz 'zo. »

« Ya, ene gwestlet da Jezuz, da vuhez a zo eur maro pemdeziek, eur sakrifiz hep paouez ac'hanout da-unan, eun oferen peurbadus. War da vele a varo ec'h echu an oferen-se. Te eo, unanet gant Jezuz da Vestr, an oan kinniget e sakrifiz, evel ar beleg a ginnig anezan. En em lez da veza sakrifiel. An enor ec'h eus d'unani da sakrifiz gant hini Jezuz. Eus da varo poanuis e tarz ar vuhez evidout da-unan hag evit ar re all. Gant Jezuz e tasprenez ar bed, gantan e kastizez pec'hejou an dud, gantan e santelaez an eneoù...

« Hep dale marteze e teuy eun dervez hag e vezo ret mervel. » Deut eo an dervez-se evit Seur Franseza-Romen.

D'ar 14 a viz meurs, e savas an Novisiadez yaouank da bemp eur diouz ar mintin, evel kustum, hag e kemeras perz e pedennou hag ofisou ar gouent. Goude lein ez eas d'he labour er sekreteri. Kalz e oa d'ober evit pourchas gouel ar brofesion hag ar wiskamant abenn antronoz. Sikour a reas he c'hoarezed, evel m'oa boazet, hep diskouez skuisder na diaezamant ebet. Da greisteiz e kemeras he fredevelan derveziou all. Koulsgoude, distro d'an Novisiad, e lavaras d'he Mamm n'en em sante ket mat awalc'h : « Poan benn », emezi. Poan benn en devezo alies, dreist-holl abaoe m'en doa bet evel plac'h yaouank ar c'hlenved hanvet e galleg « *sinusite* » ; boazet da voustra war he foan, n'hel lavare nemet dre sentidigez, o sonjal n'oa netra, hag hep hen diskouez na d'he c'hoarezed na d'he mestrezed.

Ne dlée chom er sekreteri nemet eun nebeut euriou diouz ar mintin ; goude kreisteiz e c'houlennas aotre da

zistrei da sikour, « rak, emezi, kalz a labour a zo d'ober
nirio. » Ouz ha guelel skuis ne roas ket ar Vamm an aotre
goulennet ha pedet e voe Seur Franseza-Romen da chom
azezet en Novisiad. En diskuiz e kemeras perz gant he
c'hoarezed ha gant c'hoarz ar re all en em weskas he
c'hoarz drant; e kevret e voe graet eur bourmenaden e
baliou ledan al liorz didrouz. Dalpenn en em gavas ganti
eur Superiorez hag a zistroe diouz Mons hag a lavaras
d'ezi « Guelel am eus ho tud. N'am eus ket amzer breman,
met warc'hoarz e lavarin d'eoc'h muioc'h. » Daoust d'he
c'hoant da c'houzout keleier ar gêr, ne reas Monik goulen
ebet hag e respontas : « Bennoz Doue d'eoc'h, va Mamm »,
hag e redas da gaouh tec'hoarezed.

En eur zistrei e chomjont a-sav war deleziou an Novisiad
hag epad ma oa unan o vrousta he broz, Seur Franseza-
Romen, leun he ene gant al lidou a vije antronoz, en em
lakas da gana ar c'hantik a gan ar brofeses pa gouezont
d'an douar evit kimiada diouz ar bed :

« D'ar maro, d'ar maro e vezo fin, pec'her,

« D'ar maro, Doue vezo da varner. »

Piou en dije sonjet e vije c'houec'h eur ha tregont goude-
se an Novisiadez nerzus-se dirak Doue !

Diouz ar mintin e oa bet fichet gant bleuniou ha glasvez,
en enor d'ar gouel a bourchased, skeuden ar Werc'hez
Vari, Mamm garet ha Rouanez dudius an Novisiad. En
dervez-se e oa bet kinniget rozennoù kaer laket e daou bod
e kichen ar Werc'hez santel. An eil war eben en eun doare
ha n'oa ket brao e stoue ar rozennoù re bounner o fenn
evit o gar. Digaset e voe ar podou da Seur Franseza-Romen,
azezet ouz eun daol, e kichen. Laouen da renta servij, eürs
d'ober an dra-se evit ar Werc'hez Vari a gare, her gouzout
a reomp, gant kement a deneridigez, hia savas o fenn d'ar

roz, ken brao ha tra. Lakat a reas ar podou e kichen ar
skeuden, en eur c'houlén ha kaer e oant evelse, prest d'o
renka en eur c'hiz all. En o c'haera e oa ar bokedou. Setu
aze he labour diweza ! Pebez karantez ne lakas ket hi
ennan hag en enor da Rouanez an nenv, da Vamm an Druez
divin e oa al labour-se.

Atao e pade ar hoan benn. Da beder eur o velout anezi
skuisoc'h, e voe kinniget d'ezi mont da ziskuiza ; pedi reas
ma vefe lezet war sav : « Evel kustum, emezi, bez' am
eus eun dervez epad an deiz. « Roet e voe d'ezi eul louzou
gant urz da vont d'ar goan genta a vez da c'houec'h eur
ha da vont goude-se d'he guele. Gant he c'hoarezed e
selaouas Seur Franseza-Romen al lennadeg. Wardro pemp
eur hanter, e reas he fedén ehars treid Gwerc'hez an Novi-
siad. Da c'houec'h eur, d'an taol kenta roet gant ar c'hloc'h,
ez eas da goan. Souezet e voe ar Vamm-Vestreze ouz he
guelout o tistrei koulz lavarout deustu : « Va Mamm, emezi,
n'oun ket evit debri ; poaniet am eus, met ne zisken ket. »
Ha dirak enkreze ar Vamm : « N'eo netra ; eun nosvez vat
hag e vezo echu. » Karget e voe eul leanez da veilha
warni ha da rei d'ezi, eun tammig diwezatoc'h, eur banne
laez hag a voe digemeret gant Seur Franseza-Romen gant
eur bennoz Doue, mezek eus al labour a roe.

Da seiz eur e tistroas al leanez d'he guelout. Outi e
vousec'hoarzas ar glanvourez, evel kustum, dous ha seven,
met anat e oa e tiwaske Seur Franseza-Romen kalz a boan,
rak-se e voe lavaret d'ezi chomén he guele antronoz betek
al lid a dlee beza da eiz eur hanter. Da bemp eur diouz ar
mintin, e oa al leanez en he c'hichen o c'houlén kelou eus
he nosvez :

« Fall, a lavaras Seur Franseza-Romen ; n'hellin ket
sevel evit ar gouel. Kerse e kavan ! Me bedo evit va
c'hoarezed vihan. » Unan eus he c'henvroadezed belj a

dlee kemer ar wiskamant; eürus e vije bet da veza en he c'hichen ! N'oa ket da sonjal en dra-se, rak souezet maro e voe al leanez o velout e save an dersienn da 40° 6. Ker-kent e voe diskennet Seur Franseza-Romen d'an Infirmeri.

En eur dremen dirak ar re eus he c'hoarezed en em brepare da brofesi an dervez-se : « Ne vezin ket en ho kichen evit kemer perz en hoc'h eürusted, emezi d'ezo ; ober a ran ar sakrifiz-se evit ho mennadou ha pedi rin evidoc'h. Karout a rafen gouzout ano leanez an demezel D.. (he c'henvroadez a dlee kemer ar Wiskamant) ».

En eur zisken an deleziou ec'h en em gavas gant eun Novisiadez : « Pebez sakrifiz ! » eme houman. « Her c'hi-nig a ran evit va zud », a respontas-hi en eur sonjal en he c'herent muia-karet. Unani rae er memes karantez he familh ervez ar c'hras hag he familh ervez ar gwad.

Da eiz eur e oa ar medisin en Infirmeri. Goude beza guelet mat ar glanvourez e tougase setans : « Netra skler... Beradou dour e goueled ar skevent dehou... Roc'honel aman hag a-hont... Lakit palastrou... Kenavo emberr. N'eus aon ebet da gaout. »

Daoust d'ar fizianz-se e chomas nec'het al leanezed.

Reis e chomas Seur Franseza-Romen, en em roet da volontez Doue. Ha n'en doa ket respontet d'eul Leanez hag en doa sikouret anezi da zisken d'an infirmeri hag a drueze outi dre n'helle ket mont d'ar gouel : « O ! diganin e hell an Aotrou Doue goulén ar pezh a garo. »

Dare oa ar bugel-se evit ar baradoz. D'eul Leanez hag a gennerze anezi da c'houzanv he foan hep finval, e kavas Monik he nerz da respont : « Komprenet. » ha ne finvas mui.

Fall e oa an dervez en despet d'al louzeier. Peb an amzer e kolle he anaoudegez vat. Evit seveni he c'hoant e teujod da lavarout d'ezi ano leanez he c'henvroadez... A

boan ma seblantas kompren... An enkrez a greske. D'an abardaez e tistroas ar medisin hag ankenius e voe, an taol-man, e setanz : « Gwall daget eo ar skeyent. » Pebez enkrez er gouent ! Ken karet e oa an Novisiadez-se gant an holl ; kement a fizianz o doa laketa enni he Superiozed ! Ha ken trum hag ar gurun e oa bet ar c'hlenved. Penaos kas ar c'helou d'he familh ? Ha dont a raje he zad abred awalc'h evit he guelout e buhez ?

Pebez euriou poan evit kloza eun dervez gouel !

Klasket e voe an tu da derri ar c'hlenved. Ne reas nemet gwasat. N'anaveze mui ar glanvourez den ebet ha ne seblante kompren nemet he Mamm Mestrez an Novisiadezed, pa lavare houman pedennou berr en he c'hichen.

Meur a wech e lavaras : « Mammig, mammig ! » Marteze e kemmeske an aked a gemered en-dro d'ezi hag hini he mamm galvet ganti e kreiz eun hanter anaoudegez.

Bepred e wasae d'ezi ha koulsgoude e talc'he al Leanezed fizianz atao : ken krenv, ken nerzus e oa Seur Franseza-Romen ma trec'hje marteze ar c'hlenved. Wardro hanternoz e voe ret amzav e oa Seur Franseza-Romen o vont da vervel !

An aomonier a zeuas da rei d'ezi he sakramanchou diweza. Sioul e voe an angoni, klozet a bedennou. Ar Vamm-Vestrez a rae d'ezi pokat d'ar c'hrusifi hag a aslavare goustadik en he skouarn ar pedennou hag an aktou a garantez ken karet gant ar glanvourez. Awechou e seblante he c'hulvennou o finval lavarout : « Klevout a ran. » Petra dremene en he ene brokus ? Mister. Aslavarout a rae-hi ar ger-man : « Setu me aman » ? Mar ne lavare ket anezan d'an eur-se, hel lavaret en doa ken alies ken leun e oa bet an donezon anezi he-unan, ma oa bet digemeret gant Doue. Da beder eur hanter diouz ar mintin e roe he huanad diweza, o lezel al Leanezed a oa en-dro d'ezi doaniet

kenan, metivez e peoc'h : kement e kare Seur Franseza Romen an Aotrou Doue, ken distag e oa-hi diouz pep tra!

Ar Vamm-Vestrez a reas boda Novisiadezed ha Goulennerezed e sal an Novisiad, a-raok orezon ar mintin hag a lavaras d'ezo e oa marvet o c'hoar. Goude eur pennad souez e voe goêlvann. Ken karet e oa Seur Franseza Romen gant he c'hoarezed abalamour d'he vertuz ha d'he madelez! Ne ouie ket an darn-vuia eus ar Brofeded e oa klanv; rak-se pa reas an aomonier peden eviti a-raok an oferen, e voe enkrezet an holl. Pephini a vele c'hoaz an Novisiadez ken bras, ken kaer, ken nerzus, ken leun a vuhez, daou zervez a-raok, o ficha ar japel gant bleuniou ha glasvez. N'oad ket evit lakat er penn e voe-hi maro.

E Bruksel e voe digemeret ar c'helou gant ar vrasa doan. Pa ouezas an tad, da genta, maro e verc'h, e voe skoet ha n'hellas lavarout nemet : « Maro eo Monik! Nann, n'eo ket gwir an dra-se! » Bale reas eur pennad : azeza reas da c'houde, gwasket, ha lezel a reas e zaelou da redek.

An itron Deleru, o tigouezout d'an eur-se, a voe ivez evel skoet gant ar gurun pa glevas ar c'helou skrijus, daoust d'an troiou a voe klasket d'hel lavaret d'ezi. Kouls-goude, evel he fried, ne glemmas ket, ne c'hroscolas ket. Eur pennad goude e lavaras : « Va Doue, he roet ho poa d'in, he zennet hoc'h eus diganin, ra vezo graet ho polontez santel! » emezi. Hag o tistrei wardu al Leanez karget eus ar gefridi diaes : « Ha lavarout a rit-c'houi ganin ar *Magnificat* hag ar *Salve Regina*? » Hag e krogas ar gristenez wirion-se, war he daoulin, er pedennou, a vouez uhel, daoust d'an daelou a venne o mouga.

Da c'houde en em breparas ar major hag an itron Deleru da vont da Seez, o c'halon brevet, met doujus kenan da volontez an Aotrou Doue...

E tal guele a varo Monik, ne gouezas ket o nerz-kalon.

Edo aze o bugel ker, Novisiadez vihan an Druez, ken kaer, ken glan! War he dremm kaeraet gant ar maro e sked kement a zouster ma lavaras ar major, o sonjal el levenez kavet gant Monik er gouent, o sonjal ivez en doa graet d'ezi gortoz : « Nag a geuz am eus da veza miret outi da zont aman kentoc'h, muioc'h a eürusted en defe bet. »

Pa zigemer ar gerent gant kement a feiz eun hevelep poan, e hellont beza sur eus bennoz Doue.

Graet e voe an interamant e Seez, d'an 19 a viz meurs 1929, er japel gaer en doa Seur Franseza-Romen ken karet, elec'h m'en doa pedet, eürus en he Urz devot. Kaset e voe ar c'horf glan d'ar Beljik elec'h ma tiskreiz, e Mons, e bez ar familh.

Eur skeuden feal eus ar peñ a voe Monik e ro, a gav d'e omp, al linennou-man skrivet gant an Tad Konrardy.

« 6 a viz mae 1929.

« Eürus oun o rei testeni da envor Monik. N'am eus ket darempredet awalc'h va c'hiniterv vihan evit prizout evel m'eo dleet, an holl zonezonou a galon roet d'ezi gant Doue; met eur vertuz dreist ar re all en eus skoet va spered; nerz he bolontez. Eur wech dibabet ganti he stad a vuhez, a greis-kalon en em ro Monik da Zoue. Ne vezo distroet gant netra diouz he galvedigez. Kement ha ma vezo c'hoant e c'hortozo gant ma hello he leunio. Ha pa diz ar pal, e strink he eürusted en he holl lizeri; n'eo ket e vefe chomet dizeblant o kimiada diouz he zud. Anavezet en eus Doue he foaniou kalet; met fellout a rae d'ezi en em rei da Zoue ha sakrifia d'an Hini he galve ar bed, he familh hag he natur. Leun a felle d'ezi e vefe he sakrifiz... « Me fell d'in beza leanez, a skrive-hi d'in, met n'eo ket eun hanter-hini. » N'oa ket kement-se enni frouden eun natur entanet hag a liv an amzer da zont gant liou frealzus an

Novisiad ; nann, mat e komprene danvez ar c'homzou-se. Kalz en doa pouezet warni he retred diweza : « Bez' e oa eur retred evel n'en doa ket graet c'hoaz. » Ne ouie ket e vije an diweza ; Doue her gouie hag a ginnigas d'ezi eur skouer a vuhez relijius, buhez a sakrifiz hag a labour tenn. He hini e voe ar skouer-se hep marc'hata hag heuliet en defe anezan gant sikour an hini er c'hinnige d'ezi. Met awalc'h e kavas bolontez vat e servijerez, dare evit ar baradoz.

« Sal e hellfemp-ni, pephini ac'hanomp el lec'h m'eo bet laketa gant Doue, o kemer skouer diwar Monik ha sikouret gant he fedennou, digemer a greis-kalon ar sakrifisou a c'houlenn diganeomp : Kentel talvoudek hag a lez ganeomp ar vuhez-se herr a vloaveziou, met pinvidik a vertuziou. »

A. KONRARDY,

« Misioner er Mongoli. »

* * *

Deut e oa ar pried, hep gouzout dare, e kreiz an noz, met evel eur werchez fur, Seur Franseza-Romen a c'hortoza anezan, he c'hleuzeur enaouet ganti en he dorn...

Hag aet e oa gantan d'ar sal eured.

